

MOUEZHIADeg BREIZH-VEUR '87 :

NE BLIJ KET THATCHER
D'AR GELTED *p. 10*

DAOU VREIZHAD :

TANGI PRIGENT *p. 14*

YANN-VARI PERROT *p. 20*

GERNIKA 1937-1987



*Gernika 1937,
brezel ar spont,
brezel ar gevier
p. 12*

LIZHER DIGOR KASET
D'AL LANV HA D'AR
C'h.U.A.B.

Kenvroiz ker,
Emaon o paeze prenañ el
levri "Breizh" e Pariz al levrig
Chevaux de Bretagne a zo war un
dro niverenn 6 "Skol Vreizh".
Dedennus, titouret mat ha
skeudennaouet-kaer eo al levrig-
se, e gwirionez.

Plijetoc'h e vijen bet avat o
lenn ul levr war hevelep danvez
skrivet pema-da-benn e
brezhoneg. Plijetoc'h c'hoazh e
vijen bet ma vije bet graet gant ar
reizhskrivadur broadel — pe
peurunvan — evit eilskrivañ ar
pennadoù-kaoz.

Hogen n'eo ket se ar rebech-
penañ am eus c'hoant ober
deoc'h, na pennabeg ma lizher
digor.

Ma skrivan deoc'h ez eo dre
m'on bet sebezet o weler e
pajennoù 8 ha 71 div gartenn o
tiskouez ar gouennoù kezeg hag
ar c'hezeg e "Breizh" evit eben.

Gant an Ao. Y. Le Barre eo bet
savet an div gartenn. N'ouzon ket
hag-eñ eo dre ma'z eo... berr e
anvourdegezh war istor ha
douaroniezh ar Vro en deus

"ankouezet" ar c'harternour ul
lodenn vras ha brius anezhi. Eus
bro Naoned e veman komz evel
m'hoec'h eus komprenet moarvat.

Re alies e weler hevelep
dioueroù e levrioù embannet gant
Gallaoued ha n'eus ket peadra da
vezah souezhet. Hogen, ne oan ket
engortoz eus hevelep

disouezhadenn a-berzh Bretoned,
ha nebeutoc'h c'hoazh a-berzh
"Skol Vreizh". Met daoust hag e
c'heller komz c'hoazh eus
"Bretoned" evit envel tud a
droc'h ar Vro en doare euzhus-
se?

N'on ket evit krediñ o deus an
holl dud a zo bet meneget o
anvioù e deroù al levr roet o
asant d'ar falserezh-se.

O c'hortoz diskleriadurioù
diganeoc'h diwar-benn ar c'hraf-
mañ, e kasan deoc'h ma gwellañ
gourc'hemennoù.

Gwenael Emelyanoff

NAONED



● War baotat ez a an arvestoù
trouz ha gouloù. Hini Sant
Lyphard, ur parvez war vord ar Brier
Bras, a zo bet renket gant Goulc'h an
Kervella ha *Strollad ar Vro Bagan*.
Plijus eo gwelet peñserien bro
Leon o ken-labourat gant bigrierien
bro Naoned.

○ D'an 29 a viz Mae '87 e oa gouel
e Sant Nazer. E bempvet deiz-ha-
bloaz a lide al Lise-Arnod ha pennoù-
bras a oa bet pedet. An hini nemetañ
e chom er c'hwec'hkogn avat, pa
chom c'hoazh un dek lise soudardel
bennak.

KELEIER AR C'HARNED

○ Tremenet eo dre Blogofiv, ar
Pirc'hirin, Sant Yann ar Biz hag erru
eo bremañ er C'harned. D'an 30 a
viz Mae ne oa nemet 500 eus ar Re
C'hlas da zegemer ar greizenn
nukleel breizhat. Ha savet e vo? Ul
lec'h eus an dibab eo ar C'harned:
war vord al Liger, etre Naoned ha
Sant Nazer.

○ E penn kentañ miz Even e lide
Enez Avalon, al levraoueg naonedat,
hec'h eil deiz-ha-bloaz.

○ Hevlene e lid *Mirdi ar Silinioù*, e
Bazh Gwerrann, e gantvet deiz-ha-
bloaz. Krouet e voe e 1887 gant an
Dil. Adèle Pichon, a yeas da seurez e
fin he buhez; gant Gweltaz Buron eo
renet hiriv. Daoust hag e yelo hemañ
da frer ivez?

○ Ne vez ket skignet ken *An Taol
Lagad* e bro Naoned, pezh n'en deus
ket miret ouzh skipailh Fañch
Broudig da sevel un abadenn diwar-

benn ar Groazig. Eno ez eo an darn
vrasañ eus ar besketourion, un daou
c'hant familh bennak, Bigouterien pe
Douarnenez.

○ D'ar Sul e vez abadennoù skinwel
brezhonek, mes d'ar Sulioù meur e
vez abadennoù skinwel brezhonek
diwar-benn bro Naoned. Evel-se e oa
gouestlet abadenn Nedeleg da Jil
Serrat, hag hini Bask da vro
Werrann ha d'he holen.

Diouzhtu war-lerc'h an abadenn
war an holen ez eas skipailh *Breizh o
Vevañ* da sevel un abadenn al diwar-
benn gwiniegi bro Naoned. Kollet eo
bet ar film avat.

○ Prezegennoù diwar-benn ar
sevenadur keltiek a vez kinnet gant
ur gevredigezh anvet N.E.F. e Sant
Nazer. An hini gentañ a voe
gouestlet da vro Gembre; ur bern
diapozitioù a zo bet bannet ha
displeget gant Ivan Gweheneg, en
deus graet skol gembraeg e Skol
Erispoe Laval. Lod eus ar
skeudennoù a oa bet tennet e-kerz ar
veaj dezrevellet gant Lukian Tangi
war Nnn.221 *Al Liamm*.

○ N' oc'h bet biskoazh er vro er
c'hreisteiz da Naoned? He dizoleiñ a
reot neuze e film kaer Jean-Loup
Hubert, *Le Grand Chemin*. Arabat
ankounac'haat ho poestad Kleenex.

○ Taolennet eo kreiz-kêr Naoned
gant Julien Gracq war *Ar Men
Nnn.9*. Skrivet mat eo ar pennad,
evel just, ha skeudennaouet brav. Da
dostaat ouzh An Naoned dindan
bombez ha tan-gwall Youenn Drezen
(*Youenn Drezen Kelaouenner*,
Mouladurioù Hor Yezh, 1986).

PASKAL AR MARC'HEG■

TAOLENN



Tudu

1	Golo	Picasso
2	Bro Naoned	Gwenael Emelyanoff Paskal ar Marc'heg
3	Taolenn	
4	Pennad-Stur	Al Lanv
5	Kemennadennoù	
6	Lizhiri al Lennerien	

KELEIER ETREVROADEL

10	Mouezhiadeg kannaded Breizh-Veur '87	John Idris
12	Gernika, 50 vloaz zo	Padrig an Habask

BREIZH

14	Tangi Prigent	Pêr an Intañv
17	N'eus forzh petra 1	Fañch Jeraniom
21	Léon Fleuriot (1923-1987)	Padrig an Habask
22	"Yann-Vari Perrot"	Ivon Gag
25	Geriadur Brezhoneg-Saozneg Remon ar Porzh	Padrig an Habask
28	Danevell Al Lanv :	
	Losket eo lorn an aodoù	Gwendal Denez
31	N'eus forzh petra 2 Doue en ur mirdi, poent e oa !	Bozian Truchon Pêrig Kof-Ruz
32	Golo-kein	Tudu

Evit sevel niverenn 42 *Al Lanv o deus kenlabouret* :

skridoù : Gwendal Denez, Gwenael Emelyanoff, Ivon Gag, Padrig an Habask,
John Idris, Pêr an Intañv, Fañch Jeraniom, Pêrig Kof-Ruz, Al Lanv, Paskal ar
Marc'heg, Bozian Truchon.

luc'hskeudennoù : Louis Blonce, E. Carsin, Divy, Iwan Kadored, Tangi
Manac'h, Paskal ar Marc'heg, Derec Owen, X.

tresadennoù : Paskal ar Marc'heg, Picasso, Tudu.

lizherennaouiñ : Divi Kervella.

stummañ : Paskal ar Marc'heg

sekretourva : Padrig an Habask

Ra vint holl triagareket

An holl skridoù, luc'hskeudennoù, tresadennoù zo © Al Lanv 1987 hag an
aozerien.

CPPAP 62602 — ISSN 0246-5396 — kelaouenn diskleriet hervez lezenn, Kerzu
1986 — rener : Padrig an Habask — ti-moulañ : du Marin, ar Gelveneg — Al
Lanv, 59 hent Kerdronioù Vihan 29000 Kemper — kourmant : 100 ha 130 lur.

AL LANV

PENNAD- STUR

Berzh bras en deus graet devezh ar Brezhoneg Yezh Ofisiel e Karaez ha berzh en deus graet ivez bodadeg-stourm Diwan e Montroulez. 5.000 bennak a dud a oa e Karaez d'an 21 ha d'an 22 a viz Meurzh '87. Pell, pell zo ne oa ket bet gwelet kemend-all a dud, tud yaouank nevez-deut d'ar stourm en o zouez hag ouzhpenn ar stourmerien dalc'hus ur gucennad mat a dud ne oant ket bet gwelet abaoe ur pennad mat.

Arouezius eo kement-se eus ur fiziñs nevez a zo o sevel e-touez an dud. Daoust d'an diaesterioù hag abalamour dezho ivez ez eus ul lañs nevez gant ar stourm sevenadurel e Breizh hiziv.

Sklaeroc'h eget biskoazh eo emzalc'h ar gouarnamant gall hag hini e vevelien amañ e-keñver Breizh. Sujañ, gallekaat, disrannañ! War ar skinwel e ranner an abadenn nemeñ e daou damm daoust d'ar c'hlemmoù niverus.

Krennañ spontus a reer war ar yalc'hadou roet d'ar sevenadur e Breizh, kenderc'hel a reer, avat, da foraññ miliardoù evit ar sevenadur parizian, gwall vrein peurvuiañ. En deskadurezh dre vras e kendalc'her d'ober goap eus ar brezhoneg. Daoust d'ar C'h.A.P.E.S. da vezañ bet gounezet ne zigorer ket frankoc'h dorioù ar skolioù d'hor yezh. Lakaat er-maez lod eus ar re a rae brezhoneg a-raok, da lakaat kelennerien brezhoneg en o lec'h, se n'eo ket krouñ postoù. Un touellerezh eo. Un touellerezh

ivez an anv a zivyezhek roet d'ar skolioù-Stad galleg-brezhoneg. Dre ma n'eo deus pal kelennadurezh resis ebet, nag hentenn heuliet ha diazezet ebet e reer alies n'eus forzh petra enno. Dre vras e chom dister stummadur ar vistri ha dister-kenan lodenn ar brezhoneg alies, ken divyezhek all ma n'eo ket muioc'h eo strivadeg skolioù katolik kentañ derez Bro-Leon dindan renerezh Anna-Vari Arzhur...

En darempredoù gant *Diwan* e talc'h ar Stad da ebeññ dre forzh pe zigarez a reolennoù gall unyezhek ouzh arguzennoù kelennel sirius *Diwan*. Siwazh d'ar greizennourien hon gouarn e ra berzh skolioù *Diwan* ha muioc'h c'hoazh e raint pa c'hellint labourat e peoc'h ha dibreder. Diazezet start eo savboent hon emebourien war gealiadurezh unyezhek Bro-C'hall. Ar pezh a zo mat d'ar galleg en Ontario ne c'heller ket degemer gant ar brezhoneg e Breizh. Yezh hag isyezh a zo! Mennet omp da vezañ ha mennet int d'hor distrujañ.

Da dalañ ouzh gourfennegezh ar C'hallaoued e rankomp startaat kreñvlec'h unyezhek ar brezhoneg. Gwarantañ d'hor yezh tachennoù unyezhek stabil en deskadurezh hag er vuhez kevredigezhel. Divyezhegezh a zo e Breizh hiziv, ya, siwazh, ur yezh o vougañ eben, deompñ eo da zistardañ al las-kroug da c'hellout analañ frankoc'h...

"Ni-hon-unan" hon eus bet tro da skrivañ amañ meur a

wech. An taol-mañ e krog ar slogan da zont da wir war dachenn hor sevenadur. Votet ez eus bet a-unvouezh ur skoazell arc'hant da *zDiwan* gant Kuzulioù-Meur Penn ar Bed hag Aodoù an Hanternoz, ur mennad a-du (diwenneg evit ar mare) a zo bet mouezhiet gant hini ar Mor Bihan. Kuzul ar Rannvro ivez en deus votet a-du gant *Diwan* ha div wech en deus kaset ur bodad dileuridi da Baris da glask renkañ ar gudenn. Ur pouez istorel a zo gant an degouezhioù-mañ, a-unvan eo bet dileuridi ar vro gant difennerien he sevenadur. Gant ar wellaennig a zo gant ar panelloù-hent e Bro-Dreger, gant savpoent talvoudus *Kevredigezh an Dilennidi Vrezhonek* hag emzalc'h nevez hon c'hannaded ez eus bet ganet ur spi nevez en dazont. Ken pouezus all ivez marteze meizadur nerzh ar "rannvro" pa vez unanet he dilennidi.

Ma'z eus unvaniezh ha lañs gant an emsav sevenadurel eo arabat sellet re ouzh kosterz an emsav politikel breizhat a zleje bezañ bet un harp a bouez. Bruzhnet eo ha dister e nerzh. Embann kelaouennoù a ra, avat, *Emgann, Le Peuple Breton, L'Avenir de la Bretagne...* Daoust pegen kaer pe digaez ar menzioù e chom ar pal politikel kentañ en un demokratelezh kaout tud dilennet er c'hambrou-divizout ha war an dachenn-se hep un unvaniezh diazez n'eus ket un elfenn a spi da gaout en dazont.



AL LANV



Ret eo debrññ un tamm evit kaout nerzh da stourm — Karaez '87 (sk. P. ar Marc'heg)

Panellou-hent

A van da van ez a war-raok ar stourm evit ar panellou divyezhek war vord an hentoù hag er c'hêrioù. Ret eo menegiñ ha brudañ labour kreizenn enklask Skol-Uhel ar Vro war an dachenn-se. Embannet o deus nevez zo ul levrig divyezhek-rik war o labour hag ar servijoù a c'hellont renkañ d'ar c'hummioù. Un dieal e tefe bezañ ezel eus Strollad an Dilennidi Vrezhonek da gentañ lakaat degemer en e barrez stummoù brezhonek an holl lec'hioù ha titouroù boutin! Setu eilskrivet ganeomp diwar o levrig ar pezh a c'hell Skol-Uhel ar Vro kinnig d'an holl:

a) sevel ur fichenn deknikel war anv ho kumun ha kinnig deoc'h an doare d'e skrivañ diouzh e stumm brezhonek;

b) reiñ deoc'h kuzulioù evit skrivañ anvioù-lec'h all ho kumun: anvioù al lec'hioù amez, ar stêrioù, ar parkeier, hag all;

c) reiñ deoc'h alioù evit reiñ un anv brezhonek d'al lec'hioù dizanv a c'hellfe bezañ en ho kumun: amezadurioù nevez, traoedoù, hentoù...

d) ober kinnigoù evit lakaat e

brezhoneg ar panellou all na verkont ket un anv-lec'h: servijoù boutin, lec'hioù touristikel...

N'ho peus c'hoant da c'houzout hiroc'h, skrivañ da Ar Greizenn Enklask war an Anvioù-Lec'h hag ar Panellou-Heñchañ, Skol-Uhel ar Vro BP 66A 35031 Roazon Cedex; plg. 99.38.98.88.

o tont ingal bep miz

bremañ

kazetenn
ar stourmoù
e Breizh

koumanant-bloaz : 120 lur

8 ru Hoche
35000 Roazon

D'hon lennerien,

Kreskiñ priz ar gelaouenn a rankomp ober, siwazh. 100 lur e vo eta ar c'houmanant ordinal, 130 an hini skoazell ha 18 lur e kousto an tamm e stal ar marc'hadour. N'eus ket tu d'ober a-hend-all ma fell deomp kenderc'hel da zont er-maez ha c'hoazh e raeke ar goumananterien cheñch o boazioù. Hep kostañ ar re a soñj dezho eo dleet kas dezho evit netra an holl draoù a zeu er-maez e brezhoneg, emañ ar re, niverus siwazh, a zisoñj adkoumanaññ e koulz. Trugarez a lavaromp d'ar re o deus kaset deomp reoliek o c'houmanant ha d'ar re o deus degaset reoliek o c'houmanant-skoazell, hepto ne c'helljemp ket padout.

Kudennoù tec'hnel hon eus bet ivez gant ar binvijev nevez hon eus implijet evit moulañ kaeroc'h ho kelaouenn, ar pezh n'en deus ket sikouret ac'honomp da adaptout an dale hor boa paket! Hon digarezit eta...



Kastell Diwan o sevel — Karaez '87 (sk. P. ar Marc'heg)

KEMENNADENNOU
DISKLERIADUR STOURM AR
BREZHONEG HAG EMGANN E
KARAEZ DA-GENVER
DEVEZHIAD STOURM CONSEO

Ma'z omp ken niverus hiziv e Karaez eo dre ma santomp holl eo poent bras ober ur c'hammed war-raok er stourm evit hor yezh hag hon fobl, hag enebñ kreviñ ouzhi politikerezh ar Stad c'hall a dalc'h da nac'h e blas d'ar brezhoneg e kement tachenn a zo.

— E hini ar skingomz hag ar skinwel, da gentañ.
Pelec'h emañ an abadennoù brezhoneg prometet deomp e Radio Breizh Izel pemp bloaz zo? Pet eurvezh a vrezhoneg a vez skignet gant Radio Arvorig bep sizhun?

Piv ac'hanoamp en deus gouennet diblasiñ an abadenñ "Chadenn ar Vro" en F.R.3, goude ma oa dija ken nebeut-all a vrezhoneg?

— Mouget e vez ar brezhoneg e tachenn an deskadurezh ivez.

Daoust d'an testennoù ofisiel ez eo dibosupl evit an darn vrasañ eus bugale Vreizh heuliañ kentelioù brezhoneg er skol. Piv

zo penn-kaoz ma n'eo ket mevelien ar Stad c'hall, pe skolaerien, pe gelennerien, pe renerien-skol, pe ensellerien, pe rektor an akademiezh e vefent?

Pet skol divyezhek publik a vo digoret a-benn bloaz? Pet skolaer a vo stummet war ar brezhoneg er skolioù-mistri?

Pevare 'vo savet un D.E.U.G. a-benn krouiñ plasoù keelennerien war ar brezhoneg er skolioù hag el liseoù?

Hag ar skolioù *Diwan*? Ha lezel a raïmp hon enebourien da zistrujiñ ar pezh omp deuet a-benn da sevel en ur ober dek vloaz? Sur ne raïmp ket!

— E-barzh ar vuhez ofisiel ha foran e vez nac'h et ivez e blas d'ar brezhoneg. Ur yezh hag ur yezh hepken a vez aotreet e-kerz an darempredoù etre ar vrezhonegerien hag ar servijoù publik ar galleg.

Ha m'omp deuet a-benn da c'houiñ traoù zo war dachenn ar panelloù-hent eo goude bezañ kaset war-raok ur stourm hir ha kalet.

Ret eo anavezet n'eus politikerezh hollek ebet en dachenn-se a-

berzh pennoù-bras ar Stad hag an dilenniñ. Bolontez vat un toullad maered hag ur c'huzul jeneral ha netra ken.

En dachenn-mañ, kement hag en tachennoù all e rankomp gounit ur statud a yezh ofisiel evit ar brezhoneg e Breizh.

Dreist d'al lugan e talv kement-mañ e vo anavezet ha degemeret ar brezhoneg evel yezh vroadel hon fobl, da larout eo e vo roet e holl blas dezhañ e kement tachenn eus ar vuhez sokial, sevenadurel hag ekonomikel.


War verr-dermen e talvez evidomp e rankimp:

1) gounit ur chadenn skingomz hag ur chadenn skinwel e brezhoneg evit Breizh a-bezh;

2) kaout an tu d'ober gant ar brezhoneg e kement degouezh eus hon buhez prevez ha foran;

3) lakaat ar brezhoneg da zanvez ret en deskadurezh.

Ur statud a yezh ofisiel a vo talvoudus da stourm ouzhan dilabour hag an harlu evit labourerien Vreizh dre ma krouo milieroù a blasoù labour er skolioù, en embann, er selled-ha-



Stourm ar panelloù-hent

kleved, en enklask, er c'hoariva ha sinema...

Paeozomp da glennn ha da hirezeññ *ha dibabomp!* rak un dibab a zo d'ober etre ar brezhoneg hag ar galleg. Poent eo kompren da vat ne c'hello ket an div yezh bevañ kichen-ha-kichen e-pad pell ken.

Pe e vo trec'h ar brezhoneg, deut da vezañ yezh Pobl Vreizh en he frankiz.

Pe e vo trec'h ar galleg ha n'en devo hol labour servijet da varn 'met da zidiñ un nebeud klaskerien war ar yezhoù aet da get.

BREZHONEG, YEZH OFISIEL E BREIZH!

Ar statud-mañ ne vo ket profet deomp gant ar Stad c'hall. Stourm a zo bet graet. Stourm kalet a rankomp ober c'hoazh a-benn gounit ar C'hammed kentañ-mañ war hent adsav hor yezh ha Dieubidigezh Vroadel Pobl Vreizh.

Holl asambles, troomp ur bajennad istor: hini yezh ar vezh hag an dismegañs, ha skrivomp

unan flamm: hini lore'h ur bobl dieubet.

Na stardomp ken hon meilioù-dorn gant ar gouzarn.
Savomp anezho a-benn ouzh hon enebourien.

Ha dreist d'ar Stad c'hall astennomp hon daouarn davet holl bobloù gwasket Europa hag ar bed.

Bevet Breizh!

Stourm ar Brezhoneg a gemenn:

Bodet e Pondi d'ar Sul 5 a viz Ebrel e sav grollis burev Stourm Ar Brezhoneg a-enep diviz Pariz da zrañhañ an abadennoù brezhonek er skinwel hep emglev ebet en a-raok gant ar sellerien, ar c'hevredigezhioù, ar sindikadoù. Un danjer bras eo ar c'henn-mañ evit al labour en

F.R.3 hag evit ar brezhoneg end-eeun dre ma vo skignet da vareoù gwall fail. Trawalc'h! Gant Stourm ar Brezhoneg eo galvet an holl sellerien da ziskouez o imor fall.



© FR3

UN TI EVIT AR BREZHONEG E PARIS?

Ni zo un toullad brezhonegerien eus rannvro Paris bet lakaet en o soñj sevel ur seurt "Ti ar Brezhoneg", war batrom ar pezh a zo bet graet e Brest, e Roazon hag e Karaez.

En em roet hon eus da bal digeriñ ul lec'h ma c'hello pep brezhoneger en em gavout ennañ e darempred gant e genseurted, evitañ da gaout un digarez da doullañ kaoz war bep tachenn a zo eus ar vuhez a-vremañ; gant ma vo e brezhoneg.

Tu 'vo en em zidiñ en ur bakañ barneoù, en ur c'hoari c'hartoù pe birobigoù, met ivez aozañ abadennoù efedus a bep seurt (prezegnoù, video e brezhoneg, lemañedoù, h.a.).

Bouc'het eo mat al labour dija. Kavet hon eus tud prest d'ober war-tro an ti ha d'hor skoazellañ en ur gas arc'han dre drezvankadennoù. Sur omp evel-se da gaout 2.000 lur gall bep miz da nebeutañ evit ar mare.

Met n'eo let trawalc'h evel-just, kudennoù a zo da vezañ diroustlet (al lojez da skouer) ha klask a reomp tizhout kalz muioc'h a dud c'hoazh.

M'ho peus c'hoant kaout tiouroù, skrivit pe bellgomz da: Jakez Vincent, 9 cours Debille 75011 Paris, p.g., (16-1) 43.48.02.39 pe Mark Guilloux, 100 rue

(sk. Divy)

Parmentier 7800 Houilles,
plg. (16-1) 39.68.28.98. pe
c'hoazh Radio-Bro (89.4
MHz) pep Gwened da noz plg.
(16-1) 43.73.91.53.

RADIO-BRO (89.4 MHz)
Abadennoù brezhonek : Gwener
da noz 10e30 : kelesier e
brezhoneg hag e galleg, 10e45 :
mesk-divesk (c'hoariou,
lizherou, h.a.), 11e00 : Breizh
hiziv, kelouenn, hanternoz : arz,
istor, lennegezh Breizh, stourm
evit ar yezh, sonerezh, kan ha
diskan.



Tudu

Ur post objektour zo da gemer e
strollad *Ar Vro Bagan* evit un
den desinet gant ar c'hoariva
ha sevenadur Breizh.
plg. 98.21.17.95. pe
98.04.50.06.
Ar Vro Bagan, Kresc'h ar
C'hamm 29232 Plougevev

DIWAN : Petra eo soñj Stourm
Ar Brezhoneg ?

Ne vo ket tu dere'hel d'ar
brezhoneg hep skoliou brezhonek.
An hent-se eo an hini a zo bet
dibabet gant Diwan evit difenn hag
advele yezh vroadel Breizh.

Ur gelenadurezh e brezhoneg

En ur ober dek vloaz ez eus bet
sevenet ul labour dispar gant ar
skoliou *Diwan*: evit ar wech kentañ e
Breizh ez eus ur reizhiad kelenn
brezhonek a-hed ar c'hentañ derez ha
gant an eil derez a vo savet prestik
emañ pobl Vreizh war an hent mat da
gaut ur gelenadurezh hollek e
brezhoneg adal ar skol vihan betek ar
skol-veur.

Plas ar galleg

Hogen, gant an diazezoù a-vremañ
ez eo ret diwall da chom hep
ankoumañ hast an diazezoù war zigarez
bezañ anavezet gant ar Stad c'hall. A-
viskoazh ez eo bet gouarnamantoù
Pariz, a-zehou pe a-gleiz e vefent,
enebourien touet d'hor yezh. Kement
tra a vo gounezet diganto a vo en ur
lakaat anezho da bleñañ ha neket en
ur bleñañ dezho.

"Brezhoneg" pe "Divyezheg"?

Nec'het-bras eo *Stourm Ar
Brezhoneg* o welet e vez *Diwan* o
komañ mu-ouzh-mui eus
"divyezheg" ha nebeut-ouzh-
nebeut eus "brezhoneg". Rak
divyezhek eo bet Breizh e-pad

kantvedoù, diwar-goust ar galleg, ha
ret eo d'omp, da zDiwan, da *Stourm
Ar Brezhoneg* ha d'an Emsav a-bezh
mont kontrol d'ar red-se hag advele
hor yezh da yezh ofisiel ha yezh
vroadel e Breizh.

Yezh vroadel Vreizh

Brav eo pediñ "pennoù bras" eus
Europa da zisplegañ spletou an
divyezheg; met un tamm mat
tavoudusoc'h eo lakaat Pobl Vreizh
da gompren emañ ar brezhoneg o
vervel ha ganti, gant hepken, emañ
an diskoulm da advele yezh vroadel
Vreizh.

Stourm Ar Brezhoneg, ti
Kelc'h Sevenadurel Gwened,
21 straed al Leziou-Barn
56000 Gwened



Tremen-hent Breizhek

Embannet ez eus bet gant
Kevredigezh an *Daol Grenn* bro an
Alre ha bro an Oriant, un *Tremen-
hent Breizhek* savet diwar skouer
an hini ofisiel implijet en Europa.
Divyezhek eo, da lavarout eo

brezhoneg-saozneg, ha bez' ez eus un
ugent pajenn bennak e-barzh.

Ouzhpenn ar pajennoù implijet
gant ar velestradurezh ez eus ur
garterenn a Vreizh, ur foellen gant
darvoudoù pouezañ hon Istor hag ar
"Bro Gozh" e-barzh.

35,00 lur gall eo ar priz (evit
unan) ; 23,00 lur gall adalek 10
skouerenn.

Da vezañ goulnnet gant : An
Daol Grenn, Komenaichou,
Gelegoñvarc'h 29130
Kemperle.

Kaset e vo an *Tremen-hent* dindan
eizhez. Da vezañ paet gant
c'hekennou nemek.

KRISTENON BREIZH
DIWAR-BENN BIBL AR VUGALE

Kemvad(ez) ker,
Emañ *Kristenon Breizh* o vont da
embann ur bibl evit ar vugale. Yann
ar Beg eo, Doue d'e bardono, en doa
roet lañs d'ar raktes-se.

Ar bibl bihan-se, anvet *Bibl ar
Vugale*, a vo ul levrig brav (19 x 12
cm) skeudennet-kaer gant livioù, ha
gant ur golo ruz ha lufr. 64 fejevad a
vo ennañ, troet en ur brezhoneg teun
hag aec' gant an aotrou beleg Maoris
ar C'hollo.

Heñvel-poch e vo ouzh an 10,3
million a skouerennou a zo bet moulet
dioutañ dija, en 31 yezh, ha bet
daspazhet gant an A.E.D. (Aide à
l'Eglise en Détresse) dre ar bed a-
bezh.

Kalz a dud, ha brogorourien eus
Breizh en o zouez, a gustum reiñ
arc'hant d'an A.E.D. evit ma c'hellfe
reiñ ar bibl-se d'an dud evit neñ.

Perak ne vefe ket gant ar memes
tra evit embannadur vrezhonek *Bibl
ar Vugale*? 10 lur eo hepken priz-
kousañ ar skouerenn; ma roit 500 lur
eta e vo roet... 50 bibl!

Roet e vint d'un nebeud bugale,
skolioù ma vez desket brezhoneg

eno, oaledoù, parrezioù, d'an neb a
c'houlennno e vefe ksaez dezhañ pe
dezh, ha dooc'h, evel just!

Kasit ho profoù deomp m'hoc'h
eus c'hoant sikour ac'hanomp da
embann ar bibl brav-se e brezhoneg,
evit ar vugale.

Kristenon Breizh, Lez Hinog,
Pempont 35380 Pletann Veur ;
plg. 99.07.85.03

EMBANNADURIOÙ AL LIAMM

René Le Gléau, *Dictionnaire
Classique Français-Breton*, levrenn 4
(Embel-Filen)
Yann Gerven, *Brestiz o vreskenn*
Jakez Konan, *Kenavo Amerika*

HOR YEZH

*Kendalc'h Keltiek Etrevroadel
Lannuon*, levrenn II
Aziliz Grall, *Ul Leanez Skriva-
gnerez*, *Anna Vezmew*
François Kervendal, *Ur Aod... Ur
Galon*
Arzel Even, *Istor ar Yezhoù Keltiek*,
levrenn I

MOULADURIOÙ HOR YEZH

Loeiz Andouard & Éamon O Ció-
sáin, *Geriadur Iwerzhoneg-Brezhoneg*
lur. Galbrun, *Me a Zalc'ho*
12 skrivagner yaouank, *Kaoteriad*
(rummad "Skrid")

AN HERE

Rève de Gosse, *'Raok 'n Diroll*
(kasedig)

GANT AR VEZH...

An disterañ plouzenn a ya da ober
un dreustenn e lagad ar Gall! Na
vroudit ket anezhañ neuze. Mouezh
ebet eta evit "le pen" a-berzh ar
vrezhonegerien mar plij... Breizhat
eo!

I.B.■

A galon ganeoc'h,
Gwenael Emetyanoff (Pariz, Bro-
C'hall)



LIZHIRI AL LENNERIEN

Kas a ran deoc'h ur foto a zo bet
tennet nevez zo e Naoned, er c'harter
"Car-couët" (KerKoed). An enskri-
vadurioù zo chomet e-pad ur
bloavezh bremañ
(luc'hskeudenn Tangi Manac'h)

Kenvroiz ker,
Kas a ran deoc'h ul luc'heilienn
eus ul lizher a gasan da "Skol
Vreizh" evit klemm a-zivout div
garterenn embannet en niv. 6 eus o
c'helaouenn, e-lec'h ma'z eus bet
"ankouet" bro Naoned. Grevus
eo hevelep doare ober a gav din a-
berzh an aozadurioù eus an Emsav.
Met marteze e fazian o lec'hiañ
c'hoazh S.V. en Emsav...

Kas a ran al lizher digor d'ar
C'h.U.A.B. ivez.


Kne rouez eo deuet da vezañ an
deiz a hiziv an aozadurioù o
tousañ da harzoù gwirion Breizh
ken e ranker o menegiñ ha kas
goruc'h emennou dezhe. "Bretagne
Tonique" a ra war-dro an
douristelezh "c'hlas" zo en o
zouez ha pa sav roll ar
"c'hambreier ostizien" e Breizh,
e talc'h kont eus bro Naoned.
Ouzhpenn-se, e kaver "Breizh" —
e lizherennou bihan, gwir eo —
dindan "Bretagne" war golo o
levrig-stur.

A galon ganeoc'h,
Gwenael Emetyanoff (Pariz, Bro-
C'hall)

Kenvroiz ker,
Kas a ran deoc'h 70,00 lur evit
bezañ kourmantet d'"Al Lanv".
En ur welet ar c'hudennoù ho
peus bet e-pad ar bloavezh 1986
evit embann ingal ar gazetenn,
em eus soñjet e oa ret ho harpañ
un tamm. Trawalc'h gant E.A.B.!
Chom a ra "Al Lanv" ur
gelaouenn leun a fent ha digor
d'an holl (pezh ne gaver ket
allies). Ur rebech memes tra-
steuziadur ar bannoù-treset (re
Tudu, pe troioù-kaer Yannig
Pennalet...).

Gourc'h emennou evit ar
pennadoù diwar-benn bro
Naoned!
Gant va gwellañ soñjoù
breizhek.

Tangi Manac'h (Orvez)



(sk. Derec Owen)

An engroez e Llangefni da noz disoc'hoù ar vouezhiadeg en Enez Môn

MOUEZHIADeg KANNADEg BREIZH-VEUR '87

Diskouez a ra disoc'hoù ar vouezhiadeg da zilenn kannaded da parlamant Londrez n'eus ket a harp da strollad Margaret Thatcher (ar viourien) nag e Bro-Gembre nag e Bro-Skos.

Bro-Gembre

A-raok ar votadeg, diwar an 38 sez kembreat e oa 15 etre daouarn ar Viourien, 3 etre daouarn Emglev ar Frankizourien hag an Demokratad Sokial, 18 etre daouarn ar Strollad Labour ha 2 etre daouarn ar Plaid Cymru.

Er vouezhiadeg e voe kollet 5 sez gant ar Viourien, 4 aet d'ar strollad Labour hag 1 da Blaid Cymru. E Casnewydd e kollas issekretour Kembre e gouarnamant Thatcher, Mark Robinson, e sez aet gant Paul Flynn, un den eus Gwent desket kembraek gantañ hag unan eus izili oberiantañ C.N.D. Kembre (Aozadur

evit an Dizarmañ Nukleel).

En Enez Môn en deus gounezet Plaid Cymru ur stourm istorel gant trec'h Ieuan Wyn Jones war ar mirour Roger Evans, ouzhpenn 4.000 mouezh a vuianiver. Betek nevez e oa e oa ar mirour Keith Best kannad Enez Môn. Evit ar mare emañ o c'hortoz mont dirak al lez-varn diindan an tamall da vezañ prenet lodennoù e "British Telecom" en un doare dizonest. (Prevesaet ez eus bet kalz a embregerezhioù publik gant gouarnamant Thatcher e-pad ar pevar bloaz diwezhañ-mañ. Re evel ar *British Communications* a zo e karg eus ar pellgomz, *British Airways*, *Jaguar* — an embregerezh kirri-tan — ha *British Gas*. Daoust d'an enebiezh a zo savet a-enep gwerzh perc'henniezh an holl eo deut a-benn Thatcher eus he zaol ha bremañ eo gouest da lavaret ez eus ouzhpenn 2 vilion a dud o deus prenet lodennoù en embregerezhioù-se.)

Da heul ar reuz graet en-dro da Vest o doa dibabet ar Viourien Roger Evans da vezañ war ar renk evito. Un den uhel a oa anezhañ, un anv meur e-touez stalierien viour Caergrawnt. Dic'housi a-grenn avat da gomz gant tud voutin Enez Môn. A-hend-all en doa Ieuan Wyn Jones labouret sioul evel skoazeller kannad (diofistell) e-pad 6 vloaz. Deut mat eo e-touez ar gembraegerien hag ar Gembraiz digembraeg. Er votadeg e yeas ouzhpenn 18.000 mouezh war e anv, 14.000 evit ar Viourien, 7.000 d'ar Strollad Labour ha 2.000 d'an Emglev.

Daoust da 3.000 a dud da vezañ deut da chom en tolead abaoe 1984 — Saozon war o leve an darn vrasañ anezho hag a-du dre natur gant ar Viourien — eo deut a-benn Plaid Cymru da dreñ muianiver ar Viourien er votadeg a-raok en ur muianiver a 4.000 mouezh evit ar Vroadelourien. Daoust ma oa Colin

Parry, breur Neil Kinnock rener ar Strollad Labour, an danvez-kannad labour ne voe tamm kresk ebet e niver ar mouezhoù Labour en Enez Môn.

Da noz an disoc'hoù en em vodas un engroez a ouzhpenn 3.000 a dud e Llangefni (kreizenn vererel Enez Môn e-lec'h ma voe embannet an disoc'hoù). Tost an holl a oa harperien Plaid Cymru ha pa voe embannet an disoc'hoù e voe gouel bras eno. En ur brezegenn nerzhus e tisplegas Ieuan Wyn Jones en doa gounezet Plaid Cymru war an Enez bennozha da labour ingal harperien ar Strollad, bet a-zevri abaoe pevar bloaz o tisplegañ savboent ar Plaid d'an dud hag ouzho skoazellañ war an dachenn.

E peurrest Gwynedd e kreskas ivez niver ar mouezhoù evit daou gannad all Plaid Cymru, tremen 20.000 a yeas da Zafydd Wigley en Arfon (ouzhpenn 13.000 muioe'h eget ar mirour a oa an tostañ outañ) tra ma kreskas muianiver Dafydd Ellis Tomos e Meirionnydd Nant Conwy eus ouzhpenn 3.000 mouezh.

E lec'h all e Kembre e voe dipitus disoc'hoù ar vouezhiadeg evit Plaid Cymru. E zregantad a vouezhoù a ziskennas eus 8% da 7,3%, 45% a yeas gant ar Strollad Labour, 29% gant ar Viourien ha 17,9% gant an Emglev.

Hervez ar stadegoù emañ ar muianiver eus pobl Kembre a-du gant ur parlamant bennak evit Kembre. A-dra-sur goude bezañ kollet 5 sez e Kembre e kav diaes ar Viourien leuniañ ar postoù er Sekretouriezh Kembraek. Bremañ eo ur Saoz (Peter Walker — bet rener Rann an Energiezh hag unan eus ar viourien a eneb ouzho Thatcher), kannad eus e dolead e Londrez, a zo bet anvet da Sekretour evit Kembre. Un anvadenn he deus lakaet kalz a Gembraiz da fulorñ. Kaoz a zo ez adwelte ar Strollad Labour e Kembre e savboent war an emrenerezh hag e teufe d'e harpañ. Kement-se a vefe ur mell kemmenoz evit Neil Kinnock. Bez' e oa ef unan eus enebourien bennañ an emrenerezh e 1979 ha stourmet kalet en doa da gaout mouezhoù a-enep an emrenerezh e referendom miz Meurzh 1979. Unan eus abegoù an elpenadur-se eo en deus ar Strollad Labour ar muianiver e Bro-Gembre hag e Bro-Skos tra m'o deus ar Viourien ar muianiver e kreisteiz Bro-Saoz.



Ieuan Wyn Jones hag e wreg o tegouezhout e ti-kêr Llangefni da vare kontadeg mouezhoù tud Enez Môn.

(sk. Derec Owen)

Bro-Skos

E Bro-Skos o deus kollet kalz ar Viourien ivez. 10 hepken eus an 72 tolead-votif a zo etre o daouarn, 9 gant an Emglev, 3 gant an S.N.P. hag 50 gant ar Strollad Labour. Bez' en deus bet ar Strollad Labour 42% eus ar mouezhoù, ar Viourien 24%, an Emglev 19% hag ar Vroadelourien 14% e Bro-Skos. Kollet en deus rener an S.N.P., Gordon Wilson, e sez e reter Ddn Dé. Di-

c'hortoz-kenan e oa kement-se hag un taol fall eo evit ar Vroadelourien. A-hend-all int deut a-benn da c'hounit 3 sez diwar-goust ar Viourien.

Ur gouleñn krenn a zo bremañ evit ar parlamant skosat. A-raok ar votadeg diwezhañ e oa kaoz eus "Senario Deiz ar Varn Diwezhañ". Gant ar Viourien o deus ar muianiver e Breizh-Veur met n'o deus ket anezhañ e Bro-Skos e kreder e teulo diwar-se an emrenerezh e Bro-Skos. A-dra-sur eo posupl bremañ. Kalz a

draoù a zo diouzh youl ar Strollad Labour. Sena barn Gordon Wilson, rener ar Vroadelourien «Ur gan-nadfezh skosat en deus ar Strollad Labour. Petra a raint ganti avat? Eus an 8 vloaz tremenet e c'heller tennañ ar gentel ez "azezint war o daouarn" ha ne raint netra.»

Norzhiwerzhon


Un dra cheñchet hepken e dileuridigezh Norzhiwerzhon e Parlamant Londrez. Kollet en deus Enoch Powell, unan eus izili reuzusañ ar Parlamant hag unan eus ar re startañ a-du gant unvanourien an hantemoz, e sez aet gant an S.D.L.P. (Strollad a Vroadelourien Beoc'h-us — ar Strollad Labour Sokial ha Demokratel).

Enebet ouz ar Vroadelourien Beoc'h-us e talc'has rener Sinn Féin, Gerry Adams, e sez e kornôg Béil Feirste. 35% eus mouezhioù ar Vroadelourien a yeas da Sinn Féin, bez' en doe an S.D.L.P. e niver uhelañ a vouezhioù abaoe 1975. An 83.000 a dud o deus votet Sinn Féin o deus diskouezet da c'houarnamant Thatcher e oa ur c'helic'hiad bras a vroadelourien a zalc'he da zinac'hañ an Emglev Saoz-Iwerzhonat "Anglo-Irish Agreement".

Bro-Saoz

E Bro-Saoz ez eus bet merzet un troc'h hewel er vouezhiadeg etre kreisteiz hag hanternoz ar vro. Er c'hreisteiz o doe ar Virourien 229 sez, al Labour 26 hag an Emglev 5. En hanternoz avat 59 sez evit ar Virourien, 99 d'al Labour ha 5 d'an Emglev. Kement-se a wiriaka soñjiou kalz a dud war ar cheñchamantou degouezhet e Breizh-veur en 9 bloavezh tremenet. Kreisteiz Bro-Saoz — dreist-holl ar gevred (tolead Londrez) — a zo deut da vezañ pinvidik-tre ha kalz a dud a zo aet di da glask labour. Ar peurrest eus Bro-Saoz (Bro-Gembre ha Bro-Skos ivez) a zo kalz paourc'h, niver an dud dilabour kalz uheloc'h, stad ar yec'hed kalz falloc'h, labouradegoù ne fell ket dezho en em staliañ eno. Kement-se zo kaoz e fell d'ar Strollad Labour advelet e savboent war an emrenerzh — met an dro-mañ evit kement rann a zo eus Breizh-Veur. Gwelet e vo hag-ef e c'hoarvezzo kement-se hag e talvezo evit tud Bro-Gembre ha Bro-Skos un dileuriadur a-zoare a-berzh o fobl o-unan.

JOHN IDRIS



GERNIKA, HANTER-KANT VLOAZ ZO

«Gant aotre ar Führer, e kasis di (da Vro-Spagn) un darn vat eus va flod sammerezh hag un niver bras a girri-nij chase, a vombezerien hag a ganolioù enep kirri-nij. Evel-se am boa tro da wriat en emgannoù gwir e oa gouest an dafar brezel da ober e labour. Evit ma c'hellfe hon tud tapout skiant e taolis evezh e vefe ur mont-dont dibaoez etre an div vro, lod kaset di ha lod all galvet en-dro.»

Marichal von Göring, e prosez Nürnberg, e 1945

Brezel "Bro-Spagn" a voe evit ar faskourien ar bleustradeg vras a-raok an abadenn veur. Eno e voe amprouet war an dud, koulz e voe poblañsoù dizarm ha dizifenn ha war ar soudarded republikan an armoù nevez, ar bombezadegoù, brezel ar spont ha brezel ar gevier.

E dibenn miz Meurzh 1937 emañ

ar jeneral Mola da vat gant tagadeg Biskaia, e soñj emañ da fastrañ Euskariz e teir sizhun, tost da dri miz e lakaio. A-enep enbererezh start ar Gudari (brezelourien euskarat) e tiviz ar Strollad Condor, undet karmijerezh alaman dindan urzhioù Franco, skeiñ un taol bras. Bombezañ a reont div gêr euskarat tost d'an talbenn, Durango (d'an 2 ha d'ar 4 a viz Ebrél), hep kontañ ar bombezadegoù pemdeziek war Vilbao. Ma'z eo bet damzisonfet ar bombezadegoù all eo deut hini Gernika da vezañ un arouez istorel, un arouez evit Euskariz, un arouez a frankiz evit ar pobloù all ivez.

D'al Lun 26 a viz Ebrél 1937 e oa marc'had e kêr C'hernika. Marc'had ha foar al loened gant an dud diwar ar maez, evit re kêr, ne chome nemet ar

merc'hed, ar vugale hag ar re gozh, war an talbenn e oa ar wazed...

Da 4.30 d'abardaez e voe taget ar gêr gant ur bombezer alaman Heinkel 111, un nebeud munutennoù war-lerc'h gant un eil, tan ha bombez a bep tu! Ur c'hardeur war-lerc'h gant ur Junker 52 ha chascourien Heinkel 51. Adalek 5.15 e. eo bep ugent munut ma teuas barrad draster an Heinkeld 111 hag ar Junkerien 52. Da eizh eur nemet kard e pellae ar c'harr-nij diwezhañ diouzh ar gêr tangwallet. Tan ha draih e pep lec'h, korfoù marv, tud war dec'h war an hentoù etrezek Derm, Mugica pe Mungia.

E div curvezh e oa bet taolet 50.000 kilo a vombes war C'hernika: bombez tarzh, bombez enep-tud ha dreist-holl bombez tangwallus nevez-deut er-maez eus al labouradegoù alaman. Gouest e oa ar bombez entanus-se gant o 3.000 kantderezenn grez da blantañ an tan en tiez.

Evit distrujañ Gernika o doa implijet an Nazied 43 bombezer ha chascourien: teir skouadrennig Junkerien 52 harpet gant chascourien, da lavaret eo en holl 23 bombezer ponner gant 6 chascour Messerschmitt BF109 hag ur skouadrennig a girri-nij 10 HE-51. Dizouaret e oa an holl nijerezed eus aerborzhioù Burgos ha Vitoria.

War-lerc'h brezel ar spont e voe brezel ar gevier, ne oa den kiriek eus seurt ar forfenn!

Diouzh a lavare pennoù ar Strollad Condor ne vije ket bet gouest o c'hirri-nij da nijal an devezh-se, ken fall e oa an armer.

Momes tra a-berzh Strollad-ren an armeoù faskour en e enebadenn ofisiel skrignet e Salamanca d'ar 27 a viz Ebrél:

«N'eus ket a nijerezh nag alaman nag estren e Bro-Spagn... Bro-Spagn Franco ne laka ket an tan.»

Hefnel war ar *Radio Nacional* ha war *Radio Requie*.

Ne oa e Bilbao da vare ar vombezadeg nemet pevar c'helaouenner a vicher (3 Saoz hag 1 Belgiad) ha pevar c'henskriver burevioù kelaouiñ, hini *Havas* en o zouez. Keleier *Havas* a voe ar re washañ, diwir ha dister. Pouezet e voe war vure *Havas* da guzhat ar fedoù. G. Butto, paotr *Havas* e Vitoria, a gasas e gemennadenn d'ar lañ a viz Mae, embannet e voe e

Paris d'an 3 ha da heul e Bro-Alamagn. Didamall a rae ar Frankorien hag an Nazied... padal e ouie ervat ar gouarnamantoù saoz ha gall ar pezh a oa c'hoarvezet. Mat eo d'erc'hel soñj eus klouarijenn gouarnamant gall an talbenn poblek da harpañ ar Republikaned hag eus o ferzh en digelaoadur en degouezh istorel-mañ.

Gant Isidro Goma y Tomás, eskob meur Bro-Spagn, e voe moulet ar memes testen en *Osservatore Romano*. Daoust d'an tagadennoù a-berzh ar pennoù e sinas ur strollad katoliked gall ur manifesto a-enep "bomezadeg-ur-gêr gant n'eus frozh piv e vefe" a voe moulet en *Action Française* d'an 10 a viz Mae. En o zouez e oa F. Mauriac, J. Maritain, E. Mounier, M. Merleau-Monty.

Tachenn amprouiñ a-raok an eil brezel-hed ha tachenn embregiñ ivez evit livieren c'havier ar propaganda nazi ha faskour...

Hanter-kant vloaz war-lerc'h e chom bev-birvidik tan Gernika e kalon Euskariz. Un arouez, o arouez eo. Arouez o c'hêr sakr, arouez ar goeded he dervenn sakr, arouez galloud ha frankiz Euskariz. N'o deus ket disoñjet ar marc m'en em vode Parlamant Biskaia dindan an dervenn, nag an amzer ma ranke roue Castilla touiñ al le da vezañ degemeret da aotre e Biskaia. Dindan ar weznenn e ranke ar roue touiñ mirout mammleznenn Biskaia, gwarant eus mestroniezh ar bobl ha dizalc'hiezh ar vro e-keñver Castilla. E 1476 e rankas Ferdinand (Fernando) ar C'hatholik touiñ al le hag esperout a rae Euskariz e raje komend-all roue Spagn da vare e weladenn d'ar Parlamant Euskarat bodet dirak an dervenn. Evit ket, avat!

N'o deus ket disoñjet kennebeut o barzh Iparaguirer a savas e 1853 e gan anvet "Germikako arbola" (gweznenn C'hernika). Dont a reas buan da vezañ kan broadel holl Euskariz. Ur c'han ma tasson gantañ trivladoù ur bobl a-bezh.

Taolenn vrudet Picasso he deus graet kalz da reiñ da anavezout Gernika. Emañ bremañ an daolenn e Madrid ha stourm a ra Euskariz d'he c'haout e Gernika... Da heul an 50vet deiz-ha-bloaz lidet e Gernika ar bloaz-mañ e vo staliet eno ar C'huzul Padus Etrevroadel evit ar Peoc'h hag ar Vestroniezh.

Da zeiz al lidadeg, war-lerc'h ar vunutenn a booc'h en etvor ar re marvet eno ha lennadenn manifesto ar maer e voe prezegenn Prezidant Ensavadur ar Peoc'h hag ar Sevenadur, ar Japanad Goro Kawai: «Kroget eo bet an eil brezel-hed e Gernika hag echuet e Hiroshima. Biken ne c'hellimp disoñjal an euzhennoù-se. Mes rankout a reomp mont dreist an distrujidigezh hag ar gasoni ha stourm da saveteiñ an denezh ha da gaoit ar peuzistruj eus an armoù nukleel. Hiziv e tleomp embann muioc'h c'hoazh eget biskoazh: Biken Gernika ken, biken Hiroshima ken. Ezkerrik asko.»

Deomp-ni Breizhiz ivez ez eo Gernika arouez enor ur bobl disuj, un arouez evit hor stourm a-vremañ ha da zont ma fell deomp bevañ digabestr war hon douar.

PADRIG AN HABASK

AL LIAMM

KELAOUENN LENNEGEL
BEP DAOU VIZ

Koumanant-hollz
staletren, soudelet, had d'abaoe 120 lur
Laz ar chekennou did. 100 lur

Laz ar chekennou did.
P. Le Béhan
16 rue des Foires & Chaux
35400 SAINT-MALO
CCP 3348 06 A Paris

SKRID

DANEVELLOÙ
BARZHONEGOU
TROIDIGEZHIOÙ

skrivet dreist-holl gant tud
yaouank pe penadout
nebeut-anavezet
hor skrivagnerien veur

rener : Gwendal Denez

koumanant evit peder niverenn
40,00 lur da Ber Denez
Ri, Ploare 29000 Douarnenez

TANGUY PRIGENT

gant Pêr an Intañv

Daou-ugentvet deiz-ha-bloaz lezenn ar vererien, anvet "statut du fermage", a zo bet lidet e Sant Yann ar Biz d'an 13 a viz Ebrel 1986. Ur pezh-c'hoari a zo bet savet war vuhez Tanguy Prigent hag an oberoù mat en deus graet evit an dud a labour. Ret eo trugrekaat ar c'hoarierien o deus bet ar mennozh dudus-se. Rak al lezenni-se a zo torridigezh gwir-dreist perc'henned ar menajoù da feurmioù o feadra. An 13 a viz Ebrel a zlefe bezañ lidet bep bloaz gant ar feurmierien 'vel ma c'h eo ar 14 a viz Gouere 'vit ar republikaned, gouel torridigezh gwirioù-dreist an noblañs. Evit an dra-se e vije mat d'ar venajerien en em vodit bep bloaz d'an 13 a viz Ebrel da zougenn testi eus ar sklavelezh o doa bevet ar feurmierien a-raok ma oa gallet diframmañ al lezenn talvoudus-se. Ur gwir dispac'h eo bet al lezenni-se evit ar vererien.

Mes an hent 'benn kaout al lezenn a zo bet hir ha rust. Komañset oa bet er bloavezh 1933 d'ober ur sindikad, ar C.N.P. graet gant gwir labourerien-douar ha renet gante.

Ar sindikad a oa betek neuze a oa renet gant noblañs pe juloded ar parrezioù. Ar re-mañ o doa klasket lakaat harz dezhañ. Dre n'eus forzh petore moaien, esaeñ prenañ anezhañ, en ur ginnig dezhañ (da Dangi Prigent) ur feurm da choaz gant de Guébriand. Pa oa goulnennet da vont war ar renk evel kuzulier-jeneral kanton Lanveur oa klasket e labezañ. Lavaret e oa klañv, 'vel-se ne dalveze ket votiñ evitañ. Lakaat anezhañ dizonnest penaos oa oc'h ober e stourm votadeg diwar yalc'h ar c'hoop. Gant foar "veler" Lanveur, kêr ar c'hanton, oa graet ur votadeg vras. An Ao. Guillemot, maer ha

kuzulier-jeneral, echu e resped, senatour, en doa galvet da sikour anezhañ daou vedisin all, Maze, kannad Montroulez ha Le Gorjeu, kannad Brest. Goude bezañ graet pep hini e brezogenn war an abeg ma oant war ar renk ha war ar pezh a c'hoantaent ober evit mad ar c'hanton, e voe lavaret gant Tanguy Prigent d'e enebourien: «Kaset ho peus ar brud ec'h on klañv, abalamour da se ho peus digaset war ma zro an tri medisin brasañ, galloudusañ a zo e departamant Penn ar Bed: Guillemot, Maze ha Le Gorjeu eus Brest. Setu me bremañ yac'h 'vel ur pesk.» Ar bobl a-vern er sal ha war ar blasenn a strake o daouarn hag a hope "bravo". Tanguy Prigent a gendalc'has: «An Ao. Guillemot en deus digaset ac'hon war an douar, gwilioudet en deus ma mamm.»

Tanguy Prigent zo deus eus ar skol da zaouzek vloaz gant e skrid-testeni, en desped d'e c'hoant da zerc'hel gant e studi. Karet en dije bezañ skolaer pe kelenner... E skolaer a guzalias anezhañ da vont d'ar skol-noz ha da heuliañ ur studi war al labour-douar. Lenn a rac kalz. Pezh en deus graet: da bemzek vloaz ur gevrenn sokialour, da ugent vloaz pennadou-skrid er gazetenn *Breton, socialiste*. Da bevar bloaz warn-ugent graet ar c'hoop *Défense Paysanne* e kanton Lanveur hag ur bloaz goude en departamant Penn ar Bed. Evel-se en doa lakaet un harz da sindikad Landerneve a oa e-unan o prenañ hag o werzhañ marc'hadourezh al labourerien-douar. Petra oa sindikad ha Coop Landerneve?

Ar vuhez d'ar c'houlz-se: kalz a dud dilabour e kêr. War ar maez oa poan o werzhañ an trevajoù

hag al loened, pezh a vije graet en ur priz izel-mezhus, setu an dud a oa paour. Poan o paeñ Gouel-Mikael. Ur bern eus perc'hennoù ar menajoù a lakae gwerzh war o mererien hag o c'has kuit. Ne oa lezenn ebet d'o difenn.

Gwelet 'm eus Tanguy Prigent o herzel ur werzh forset. Ar c'harr cost oa lakaet e gwerzh da gentañ. Tanguy Prigent o vont er c'harr gant tri bugel ar familh. Lavaret en devoa 'vit petra ne oa ket kap da baeñ Gouel-Mikael diouzhtu. Ur vuoc'h lart n'en devoa ket gallet gwerzhañ, n'en devoa kavet nemet dek gwerzhennig al lur eviti hag ur vuoc'h all oa marvet o halañ. An dud a breno un draig bennak zo o herzel ar familh-mañ da labourat. Setu an hini a esaeo prenañ ar c'harr-mañ a gemaer ar garg da sevel ar vugaligoù-mañ. Den n'en devoa skoet war ar c'harr.

Bodadeg kentañ gant Tanguy Prigent e Pont Menoù er bloavezh '33. E zisplegadenn a ziskoueze dimp penaos pa vijemp unanet 'barzh ur sindikad graet gant labourerien wirion e c'hallfemp kaout ul lezenn hag a rofe dimp ur suretad da chom en hon menaj nav vloaz en ur briz skiantek (statud ha droad da adober mes an aotrou pe unan eus e vugale hep bezañ e fernañ). An douar eo ostilh kentañ al labourer-douar gouest da labourat douar.

Tout hon eus droad da gaout labour e kêr 'vel war ar maez. An dra-se eo hon liberte. Mes ne vefomp ket dieub 'keit ma ne vo ket votet lezenn ar "statud fermaj". An dud war ar maez oa minellet hag huallet o zreiz. Difenn an droad da vevañ zo



Tanguy Prigent

dilect. An dra-se zo posupl ma vefe votet al lezennoù a rofe dimp ar galloud da reiñ hon ali war ober prizioù hon trevajoù hag hon loened. Disklêriañ 'reas sklaer dimp penaos ec'h afe en-dro al lezennoù anvet *Offices Mutuels "Kenetreoù"* ar re o devez gwalleurioù, klefvedoù, tangwall, ha.

Evit retred ar re gozh. Evit ma c'hallfont diskiuzhañ en o c'hozhni e vo ret ober ur yalc'h evite. Bremañ e vez betek tri rummad tud er memes ti. Ar paour-kaezh kozh evit gont e voued a zalc'h da labourat, ken na c'hourvez en ant en devez klieuzet e-unan.

Graet hon devoa goulnennet outañ ha dreist-holl "perak komanantñ en ur sindikad broadel?" Respont: ar goulnenn lezennoù a rafomp evit gwellaat hon stad buhez. Ret eo

kaout ur sindikad broadel kreñv. Dre-se e rank hor goulnenn bezañ broadel. Setu eo ret kaout ur sindikad hag a c'hallfe ober pouez war renerien ar vro.


Pa oa echu ar vodadeg kentañ e Pont Menoù e teuas d'am c'haout hag e c'houlennas diganimp mont en e sindikad. P'o devoa asantet ar pemp oamp eus Plistin e oamp act gentañ.

'Benn nebeut a zevezhoù goude hon doa bet ul lizher da c'houlenn diganin aozañ bodadegoù e kanton Plistin. Graet em boa e Treduder, Tremel ha Plistin. Goulnennet en devoa diganin lavaret 'vit petra e oan act er sindikad C.N.P. Kalz a from am boa bet. Lavaret em boa dezhañ ne gomzfen ket ken. Eñ a lavaras din: «Bremaik e Tremel e c'houlenni digant an dud e galleg penaos e vefe

ar gwellañ gante e komzfes, e galleg pe e brezhoneg.» Graet em boa evel ma c'houlenne. Ar selaouerien a oa gwelloc'h gante brezhoneg. Pa oa echu e lavaras din: «Act out gwelloc'h e brezhoneg, dre ma soñjez e brezhoneg; setu 'peus daou labour pa gomzef e galleg.» Ma lavaran an dra-mañ ez eo evit diskouez penaos en devoa stummet peizantet da brezeg dirak ar bobl.

Goude-se e c'houlenne ac'hon da vont d'e heul e departamant Penn ar Bed hag en Aodoù an Hanternoz. Lakaet en devoa ac'hon e darempred gant Boguen, kiriek C.N.P. eus Aodoù an Hanternoz.

Unan eus ar bodadegoù zo engravat em spered, hini Lanveur gant foar Veler. E-kreiz stourm ar votadeg evit kuzul-jeneral ar



Sant Yann ar Biz, parrez Tangi Prigent (sk. E. Carsin)

c'hanton. N'en doa ket c'hoant da vont war ar renk dre ma c'houverze e vanke pevar devezh dezhañ da gaout 25 bloaz, dezhañ da gaout droad da vont war ar renk. Ar c'huzulier a oa echu e resped, an A. Guillemot, medisin, maer Lanveur ha senatour. Ar sal ha plasenn an ti-kêr oa leun-kouch. E enebourien o devoa disizians 'vije start sparlañ gant Tangi Bihan war al leurenn brezeg a sante o dije d'ober gantañ. Setu oa ret dezhe labezañ anezhañ. Kaset ar brud e oa klañv, evit petra votiñ evitañ? Frejoù e stourm graet gant arc'hant ar C'hoop... Mezhus eo gwelet tud o lavarout bezañ onest ha kredit displegañ seurt gevier lous. An dra-mañ dre ma ne oant ket gouest kontañ anezhañ war e uhelvennad. Goude bezañ lavaret penaos hag evit petra e oa war ar renk, goude en devoa staplet gante:

«Lavaret ho peus e oan klañv, abalamour da se 'peus digaset an tri medisin brasañ eus Penn ar Bed war ma zro! Guillemot, Maze depute Montroulez, Le Gorjeu eus Brest.

Setu me bremañ yac'h-pesk!»

Pebezh c'hoarzhadeg ha stakadeg daouarn gant ur mor a dud evel ma ne'm boa ket gwelet c'hoazh. Tangi Prigent a gendalc'has hag a lavaras en doa an A. Guillemot digaset anezhañ war an douar, en devoa gwiltoudet e vamm. Memes mag en dije gouvezet d'ar c'houlz-se e vije e enebour politik, n'en dije ket graet droug din, ur medisin mat hag eeun en e vicher. Mes ur politik fall a ra evit al labourerien. Dre-se, en ur votiñ socialist, e laoskfet anezhañ d'ober pezh a ra mat. Ar selauerien a zibrade, a stlake o daouarn.

An A. Cudennec, a oa war al leur-brezeg a lavaras: «Ret e vo deoc'h rentañ kont ar C'hoop...»

Ar respont oa deut krenn-sec'h: «N'oc'h ket c'hoazh barnet-meur.»

Kouezhet e oa ken buan war e gador 'vel ma'n dije bet un taol dorn. Rak ne oa nemet grefer barnet a boc'h. Setu adarre c'hoarzhadeg ha

stakadeg daouarn muioc'h evit biskoazh.

Gwelet e oa bet en devoa gonezet pep selauer.

Tangi Prigent e-unan a wele an dra-se hag a lavaras en ur dreñt etreke an depute Maze:

«N'it ket da vezañ nec'het ma welit an dud a-du ganin. N'eus nemet ar socialisted o tifenn al liberte gwirion, hep hennezh e vije an dud e renk al loened, o tifenn al labourierdouar evit m'ober ar suretaz en o labour hag ma c'hallfent bevañ dezoutañ evel zo dleet.»

An dra-mañ zo e-berr ar vodadeg a oa padet div eur.

Goude, e gamaraed a oa en em zastumet en ur sal ostaleri. Lavaret en devoa din peseurt deiz e dife ober ur vodadeg e Lokreg, klevet en devoa e vije torret e c'henot dezhañ. «Kap 'vefes da dont ganin? Al Lann a deuo ivez.»

E Milin-Aod e oamp. 'Benn en devoa kraoet 10 munutenn, un den a lavaras krefiv: «Paotr-saout Sant Yann ar Biz d'ar gêr!»

Al Lann ha me o vont unan a bep tu dezhañ, o lavaret: «Grit un tamm sell diouzhimp da gentañ!»

Tangi Prigent a lavaras dezhañ e brezhoneg: «Ne gave ket deoc'h lavaret ar wirionez. Me zo evel tout bugale al labourerien-douar, kentañ labour 'm eus graet eo mesa saout.»

Setu Tangi Prigent tremenet kuzulier departamant Penn ar Bed. Mes ar vot kentañ oa torret dre ma vanke dezhañ pevar devezh da gaout e 25 bloaz. Tri miz goude, ad'fhaet ar vot, en devoa bet 106 mouezh muioc'h. Hag eñ yaouankañ kuzulier-jeneral Bro-C'hall.

E enebourien a wele e oa deut un den danjerus evit ar re o devoa gwiriou-dreist. Ret oa dezhe lakaat harz dezhañ dre forzh peseurt stumm. Sindikad Landerneve pa oa bet oc'h ober e vodadeg kentañ e Kastell-Paol en devoa de Guebriand kinniget dezhañ labourat gante hag en dije da zibab ur gomanant eus an 210 en devoa e Breizh. Tangi Prigent en devoa lavaret dezhañ mont war al leur-brezeg ha disklriañ an dra d'ar beizanted a oa eno. Evel just e oa aet kuit. Tangi Prigent oa aet war-c'horre da lavaret pezh oa kinniget dezhañ.

«Mes, me, n'on ket un den da vezañ prenet. Me 'm eus un uhelvennad hag e heuilhin anezhañ e-pad ma buhez, gwelloc'h eo ganin bezañ paouroc'h mes bezañ eeun. Anavezout a rit tudou o deus labourat da heul ar re binvidik a zo deut pinvidik, mes en o c'houstiañs n'int ket evurusoc'h.»

Tangi Prigent zo ganet bihan, labourer en deus, en em gannet eo evit an dud eveltañ ha marvet eo paour, dre-se eo chomet feal d'e uhelvennad.

Ret e oa neuze klask gwaskañ ar re en devoa stummet d'en em gannañ gantañ. Setu, er bloaz '35, perc'hennou menaj ma zud a lavaras din: «Gout' a reus n'eo ket Tangi prigent en deus douar da feurmiñ.» An dra-mañ evit reiñ din da gompren ma tale'hfen d'e heuliañ ne vije ket feumet ar menaj din.

Respont a ris: «Me zo 'veldoc'h, me 'sall pelec'h 'vez ar gwellañ 'vit ma yalc'h. Pa brenan ur sac'had temz eus Coop Prigent e vez 4 real gwelloc'h marc'had ha pa werzhan greun 4 real dre gant muioc'h.» Da dud evel-se ne vez ket komzet a

N'EUS FORZH PETRA



Tudu

Ne baouezet ket da gavout pesadra da leuniañ ar bann-mañ er gelaouenn. E-giz pa vije bet divizet gant an droched ober ur genstrivadeg 'vit kaout an enor da vezañ embannet el Lanv.

● Da gentañ, Laurent Fabius, ministr kentañ ar prezidant Mitterand ur pennad zo hag unan eus renier ar P.S. Goulnataet war T.F.1 da leur d'an 12.03.87, setu e respont: «Il faut être unis comme les dix doigts de la main.» Gwashoc'h eget «les quatre coins de l'hexagone» a glever alies a-walc'h ivez.

● Chom a reomp gant ar bolitikourien evit reiñ deoc'h da dañva un disklriadur gant an imbisil Pasqua diwar-benn ar beulke Pandraud. Graet eo bet an disklriadur-mañ war Radio-Orient e Pariz goude ma vije bet lavaret gant Pandraud e oa Malek Ousekin ur genaoueg, e vreur ul laer hag e c'hoar ur c'hast!

suffisamment « Je connais d'abord, il n'est pas plus raciste que n'importe quel autre membre du gouvernement. Je crois que, dans ce domaine, il faut être extrêmement prudent et veiller à ce que l'on dit. »

10.03.87 (Ouest-France)

Karout a rafemp gouzout piv n'eo ket gouenneler er gouarnamant!

● Tro hon eus bet da lenn kement-mañ e-barzh *Ouest-France* (18.05.87) e-kreiz ur pennad sinet gant Alain Cabon diwar-benn ar gerdar nevez-embannet gant Garnier.

C'est à cette tâche ambitieuse que s'est attelée, à la demande des éditions Garnier, la fine fleur des 600 000 bretonnants, une équipe d'Engleo Breiz et de Brud Nevez (qui en a assuré jusqu'à la frappe), sous l'autorité tranquille de Pierre-Jakez Hélias.

Fidamdustik ha tripledie!!! Bevet hon eus, eta, betek an deiz a hirie hep gouzout e oa skipailh *Brud Nevez* hag *Engleo Breiz* «la fine fleur des 600.000 bretonnants!»... Evit sevel petisionoù, ya sur, eo aet meur a wech ar maout gant *Engleo Breiz*. Evit ar pezh a sell ouzh desevel o bugale e brezhoneg, aze avat, e chom ul lodenn vras eus «la fine fleur» war ribl an hent. Pouezusoc'h koulskoude: peogwir e tispleger deomp eo bet graet al labour skriverezh gant *Brud Nevez* e karfemp gouzout:

— ha graet eo bet al labour-se evit ur bennozh-Doue pe gopret eo bet (brav, moarvat...) gant Garnier? — gant piv eo bet graet al labour? Gant un den bennak enskrivet en A.N.P.E. (ha kavet labour gantañ e-giz-se), pe gant unan eus pennoù-bras *Brud Nevez*, hag eñ war e levez? Gant ma kavo «la fine fleur» kalon a-walc'h da respont d'ar goulennoù-se. Roparz Hemon a ra gant ar ger «dastum-kargoù» evit «cumul». D'am menno e vefe bet gwelloc'h ober gant «dastum-goprou». Petra 'soñj deoc'h, Andreu Merser?

FANÇH JERANIOM



uhelvennad, n'eus nemet an arc'hant a gont dezhe.

Lakaet oa da enebit deuzoutañ ar c'hont de Saint-Simon eus l'Action Française, mes hemañ n'en devoa ket trawalc'h a bouez. Neuze oa digaset en e vodadegoù ar fasisted glas. An dra-mañ dre ma vijent da heul Dorgères. Ur vandenn tud yaouank gwisket gant rochedoù glasgwer ha bizhier da skeñt ma vije ret. E Sant Wazheg oa skoet Tangi Prigent d'an douar pa oa o vont da respont Dorgères, tennet oa eus ar stad-se gant e gamaraded.

Ur wech all oa skoet pebr dezhañ en e fas. Setu pa n' deo klevet e tlefe dont da Blouigneu, digarez foar al Lid, en devoa dastumet ar muiañ posupl a gamaraded ha lakaet an eur dimp evit gallout en em glevet a-raok e vije erru Dorgères. Tangi Prigent gant tri mignon all oa aet war al leurenn brezeg. An hanter eus ar sal oa laosket libr evit diskonez dezhañ oa libr d'ober e vodadeg.

DALCHOMP SONJ!

Kelaouenn istorel vrezhat
- trimiziek -

15,00 lur an niverenn
Koumanant : 70,00 lur

36 straed Emile-Zola
56100 an ORIENT

Stephen Roche,

marc'houarnner gwellañ ar bloavezh, hag a zo Iwerzhonad evel ma oar an holl, en deus embannet en doa hendadoù breizhad ! Setu na oa ket evit souezhiñ Yannig Pennkalet...

Pa oa en em gavet Dorgères en devoa lâret ne gomañse ket ar vodadeg a-raok un hantereur. 'Benn ur pennad-amzer, ur roched glas a roas ur baperenn da Dorgères. Kenkent e lampas d'an traoñ. Tangi Prigent a hopas "harzet anezhañ!" "Tal ma c'hichen e oa, kroget em boa e gol e vantell, unan all eus Tremel oa ivez. En em zifreñt 'reas hag ur paotr e roched glas oa o sachañ da sikour anezhañ da vont kuit. E vantell oa rannet e daou ha chomet an hanter em daouarn. Tangi Prigent a hopas heuliañ anezhañ. Kavet hon eus anezhañ e porzh embregerezh ar Wern, daou gam'ion oa digaset betek o hanter e-maez ar c'harrdi. Dorgères oa pignet war-c'horre, en-dro paotred o rochedoù glas gant bizhier o herzel an dud da dostaat. Marzin, eus ar C.G.P.T., kamalad servij Tangi Prigent, a oa a-drek ar pomp esañs oc'h en em gannata, ur vazh gantañ. Tangi Prigent a gelennas ac'hanomp da vont, hep stourm, dre o dreg. "Vel-se hon eus gallet mont war-c'horre ar c'hamionoù un dek bennak. Tangi Prigent a lavaras: «Pa lârin "bout" e skofoomp anezhañ d'an traoñ.»

Un hanter vnutenn goude en devoa lavaret "bout".

Me oa en em gavet fri-ha-fri gant Dorgères. Me a lakaas ma arvrec'h war e c'hoùg. Mes eno e oa bet bec'h warnon, dek o vountañ eus un tu ha kemend-all eus ar rochedoù glas. Evel ma vijen bet en ur wask; kaout a rae din e oan o vont da vougañ. Un den bras, war-dro daou veir, a grogas e Dorgères hag a dennas anezhañ eus e stad diaes. Dorgères a gerzhas kuit, diwallet gant e vandenn rochedoù glas. Al lodenn vras eus an dud deut d'ar foar, feuket o welout tud estren d'ar bro Dreger o tont da gemer mestr warnomp, en em lakaas war an ton kann da huchal a-vouezh-uhel: «Dorgères, d'ar gêr! Dorgères d'ar gêr!»

Pemzektez goude e oa bet ar Bear. Tangi Prigent oa douget gant daou gamalad hag an dud o stlakai daouarn.

En desped d'ar c'hann arloupet, dispriuz a-wechoù, graet a-eneb

dezhañ, e oa tremenet Tangi Prigent kannad e Mae 1936. Ar yaouankañ er Frañs. Kalz a lezennoù da lakaat gwellaat stad buhez labourerien kêr ha war ar maez, lezennoù sosial, ar sizhunvezh labour daou-ugent eur, pemzektez ehan-labour, Ofis ar Greun, priz ar greun oa lakaet gant ur bodad tri rummad tud, peizanted, bevererien hag ar re a rae kofvers, a voe graet. An efed oa bras, priz ar gwinizh, 36 livr ar c'hant e miz Gwengolo 1935 ha 90 livr ur bloaz goude. Ar priz teir gwech uheloc'h e '36 eget er bloaz a-raok, hag ar bara n'oa ket keroc'h nemet eus 10%. Se oa abalamour d'an drafikerien oa lakaet war o gonid mezhus pa oant libr d'ober o giz. Ar beizanted oa gwellaet o stad, setu e prenent traoù o devoa ezhomm ha n'o devoa ket gallet kaout bloavezhioù oa. Ar vicherourien oa kresket o labour, ar vuhez ekonomikel a oa bavaet. Mes Tangi Prigent oa diskontant, n'en devoa ket kavet muiañ-niver evit votiñ ar "statud evit ar vererien". E enebourien, ar re wenn betek ar radikaled a lavare e oa se ur gwall da wir ar berc'hentiez. Koulskoude en devoa lavaret en e brezegennoù e kamb ar gannaded penaos ne oa ket ar sosialisted a-enep an droad perc'hentiez ha dreist-holl an hini gonezet gant labour an den, mes ne c'houlenne nemet ar surentez evit ar vererien da chom nav vloaz en o menaj ha gallout adober al lizher-feurm memes ma teufe an aotrou pe unan eus e vugale da zerc'hel. Se oa memes talvoudus evit ar vro. Rak penaos en devo ar peizant kalon da digas vad en e gomanant ma n'en devoe ket surentez da chom er plas.

Pa deue da welet ac'hanon d'ar menaj e konte din gant trisidigezh tout ar pezh en devoa graet evit lakaat ar re a lavar bezañ republikan da gompren penaos eo evit reiñ o liberte da vilierioù a beizanted er Frañs. Da c'hortoz al lezenn, darn eus ar perc'hentioù komanant a ra ar briz a blij dezho, devezhioù labour, kas o bugale d'ar skoll gristen.

Da skouer, pezh a zo graet d'un tonton. Ma zontan a zlee dornañ da Yaou. Mes deut oa d'ober dour e-pad an deiz. Ar c'hig evit an dornañ oa prenet. Setu an deiz war-lerc'h oa



Ti-kêr Sant Yann ar Biz, warnañ ur blakenn en eñvor da Dangi Prigent

(sk. E. Carsin)

roet d'an dud. An deiz war-lerc'h oa deut perc'henn ar menaj da lavaret dezhe e rankent mont er-maez da C'houel-Mikael peogwir o devoa roet kig d'ar Gwener. Al lizher-feurm da digor tri bloaz ha tri bloaz. En o c'hwec'hvet bloavezh e oant. Kaer o devoa esa reiñ da gompren d'an aotrou m'o devoa roet kig d'ar Gwener e oa abalamour d'an amzer fall, ne oant ket kap da laoskel o c'hig da goll. Mes ne c'houlenne intent mann. Aet e oa ma zontan ha ma zintin da gaout ar person. Hemañ en devoa lavaret d'an aotrou: «Ho merer n'en deus ket touet Doue o reiñ kig d'ar Gwener, pa c'h eo amzer zo kaoz.» Evel-se ne oant ket bet skoet er-maez.

Setu Tangi Prigent a gelenne d'e gamaladed sindikad dere' hel gant hon emgann. Er bloavezh '37 e oa graet ur vodadeg veur en Uhelgoad evit tri departamant: Penn ar Bed, Aodoù an Hanternoz hag ar Mor Bihan. Calverac, prezidant broadel ar C.N.P. ha paotr ar yalc'h oa deut. Etrezomp hon eus gwelet petra oa graet evit ar

vicher, ar pezh oa mall ober. Statud ar vererien dreist-holl. Ur mennad oa kaset d'ar gouarnamant.

Diouzh an abardaez e oa graet un vodadeg vras. Ar sal oa leun. Ar C.N.P. a dalc'he da greskiñ en desped da'bouez ar re binvidik war o mererien. Goulennet e oant da brezeg e brezhoneg, ret e oa diskouez e oamp e-kreiz Breizh. E-berr em boa lavaret: na n'eo ket a-walc'h labourat kalz hag en doare skiantek, mes ret eo difenn hon liberte, hon dellezegezh hag ar surentez da vevañ evel a zo dleet eus hon labour. Mes an dra-se n'hon devo nemet ma vefomp unanet. Nerzh an arc'hant zo a-fas dimp, mes niver an dud a labour zo an uhelañ. Setu e lavaran deoc'h: war-sav ha war-raok atav!

Pa oa kroget ar vrezel-mañ e oa em c'harg kanton Plistin, Plegad Gweran, Gwimaeg, Lokireg, betek Logivi Plougraz. Engalvet, kaset da Bariz e "défense passive" dre

ma oant tad a dri bugel. Erru eno em boa skrivet da'm mignoned a ouien e oant e Paris. Tangi Prigent, pevar devezh goude, en devoa skrivet din mont d'un ostaleri ru-veur Orléans. Eno hon devoa evet pep a vammac'h a-raok debrñ, ur paotr-lizhiri a deue da Sant Yann ar Biz e vakañsoù bep bloaz a oa ganimp. Goude e pedas ac'hanon da goañañ e ti-debrñ ar Palais-Bourbon. Diskouezet en devoa kamb ar gannaded, pemp depute all oa memes taol ganimp...

Goude oan tapet da brizoniad, goude bezañ baleet pevar brevezh a-raok an Alamanted, d'ar 17 a viz Even '40 e departamant al Loiret. Goude n'omp ket en em welet ken na oa echu d'ar brezel. Mes dre geloù digant ma gwreg em boa gouvezet meur a dra, e oa klasket gant an Alamanted. Goude em boa gouvezet 'vije koachet gant kamaraded.

An 10 a viz Gouere e oa eus ar 80 o devoa votet a-eneb reiñ ar galloud da Pétain.

E miz Du '40 en devoa lakaet war-droad an eneberezh anvet "Libé-Nord", ur rouedad war 19 depart-

« YANN-VARI PERROT »

ur pezh-c'hoari gant Strollad ar Vro Bagan

D'an 11 a viz Ebrel 1987 oa bet c'hoariet, evit ar wech diwezhañ, gant "Strollad ar Vro Bagan", ar pezh c'hoariva oa bet savet gante diwar-benn Yann-Vari Perrot.

Trouz a-walc'h oa bet en abeg d'ar pezh-se, n'eo ket en Emsav nemet-ken hogen er vro ivez. Kalzik a bennadoù oa bet er c'helaouennoù hag a-raok ar c'hoariadenn gentañ e Montroulez, d'an 13 a viz Kerzu 1985, oa bet diviz er c'huzul-kêr, diwar goulenn ar guzulierien P.C.F., da c'houzout hag aotren pe difenn c'hoari ar pezh a vije graet.

Ya, en em lakaat da sevel ur pezh diwar-benn Yann-Vari Perrot ne oa ket aezet.

Lod a lavar ne c'helled ket sevel ur pezh diwar-benn un dra re dost ouzhip. Gwir eo kazi-sur, hogen ar pezh-se, n'eo ket ergorel, objektivel. Bez' e vez tost un darvoud istorel ouzhip pa vezomp "perzhidi" ennañ c'hoazh, da lavaret eo pa zifenner hardiz den pe zen ennañ evel ma vefe un dra pouezus-tre evidomp. Daoust ha bez' e c'hell an dud kaozeal seder a-walc'h diwar-benn an darvoudoù c'hoarvezet e Bro-Frañs er brezel diwezhañ? N'eo ket sur evel just, sellit ouzh prosez Barbie... kement a draoù oa bet savet goude a-drugarez da "vojennoù" zo...

Amañ, ouzhpenn-se, e yac an "tabou" pelloc'h evit ar pezh a c'hoarvez gant lodenn vrasañ an darvoudoù eus ar mare-se ; ne ouied netra sur diwar-benn ar Perrot, bez' e oa an afer-se un dra n'helled ket kaozeal diwar e benn ha pa ne vije nemet evit gouzout ar pezh oa bet c'hoarvezet zoken. Evit lod e oa ur sant, evit lod all, un treitour deus ar re washañ...

Ar c'hostezennoù a oa e kont en afer-se ne oant ket, kredapl, gwall blijus, gwall entanous da soñj

c'hoarietien Strollad ar Vro Bagan : ur beleg a c'hiz kozh ne oa ket un haroz skwer evit ar re o doa savet buhez Dom Mikael..., ar Rezistañs hag ar P.C.F., diouzh an tu all, gant o broadelouriezh c'hall hag an enepbrezhonegelouriezh a vez gante alies ne oa ket ur mel gwall lipous da c'houst c'hoarietien ur strollad brezhonek.

Hogen en em gannañ ouzh an "tabou" an hini a zedenne anezhe kazi-sur: n'eus ken sellet ouzh ar pezh-c'hoari hag a zo kentoc'h ur pezh diwar-benn an "tabou-Perrot" eget unan diwar-benn "Yann-Vari Perrot merzher ha treitour", hen meizañ a reer pa zifenner ar pezh. Ha se 'n'ni 'zisklêriont int o-unan el levrennig zo bet embannet gante: « A-vec'h kroget gant hol labour diwar-benn Buhez Yann-Vari Perrot eo bet anat deomp pegen diaes oa eur seurt pezh-c'hoari: (...) Setu m'omp deut da sonjal ober eur pezh-c'hoari diwar-benn an DIAES MA'Z EO KOMZ DIWAR-BENN YANN VARI PERROT. Eun dra Vezus da lod, eun dra Sakr da lod all, EUN DRA ZIFENN d'an holl kouz lavaret. » (p. 22) (*)

* * *

Ur pezh diwar-benn Y.-V. Perrot, beleg hag emsaver, eo memes tra evel just... A-daolennadoù e vez diskouezet deomp doare e vuhez hag e stourm.

Diazezet eo an abaden "istorel"-se war un enklask oa bet graet gant tud ar strollad (ha savet ez eus bet ul levrennig gallek-brezhonek gante diwar-benn ar fedoù istor zo e darempred gant an afer hag o fezh... kentelius eo...) Un toullad komzoù en abadennoù-se a zo, war a seblant

din diantav, komzoù bet lavaret pe skrivet e gwirionez gant an dud. (Un nebeud traoù diwir pe direizh zo da vezañ rebechet sur a-walc'h, unan zo hag am eus bet remerk: ur c'hemmesk zo etre daou zarvoud nevez-c'hoarvezet e Skrignag, e gwirionez e oa bet diskaret ar groaz a-raok na vije bet lakaet "monumant" ar re varv da darzhañ...)


Un adsked eus oberenn vras Y.V. Perrot a vez roet deomp, da lavaret eo luskad ha gouelioù ar *Bleun Brug*, gant traoù ha n'int ket anavezet kalz: an taolennoù c'hoariva a veze graet e-kerz ar gouelioù-se da geñenn Istor Breizh. "Diwar c'hoari kelenn" e-giz ma skrive Y.-V. Perrot.

Prantadoù hir-mat a ya gant an abadennoù-se. Taolennet e vez deomp aloubidigezh an Normanted, stourm ar Vretoned oute, stagidigezh Breizh ouzh Bro-C'hall...

Perak? Evit diskouez un arvez eus gouelioù ar *Bleun Brug*, eus labour Perrot? Pe peogwir en em sante Perrot hêr da hengoun ar stourm-se? «Ar pezh eo bet gouest hon tadou koz da ober gwechall perak n'her grafemp ket ni ivez?» a lenner, p.25, e levrenn Strollad ar Vro Bagan.

Gwelet e vez ar beleg hag e drubuilhoù en doa gant an eskob en abeg d'e vroadelouriezh... a gaved re splann e gouelioù ar *Bleun-Brug*...

E stourm a-enep an enep-kloaregelouriezh a vez diskouezet ivez. Etre an daou vrezel e voe c'hoariet, er vro, ur pezh 'enep ar veleien: "La Terre des Prêtres". Arvestoù zo eus ar pezh-se a vez c'hoariet dirazomp hag evel-se e vez roet un alberz, ampsis ha distreset gwir eo, eus roll ha pouez an iliz er vro... Ha gwelet e vez ivez Y.-V. Perrot o kemer perzh er stourm ouzh ar pezh-se.



Yann-Vari Perrot

Yann-Vari Perrot a vez taolennet deomp e-kreiz darvoudoù zo eus e vare: ar brezel '14, kelennadurezh ar galleg er skolioù, ar simbol... Diskouezet e vez ivez, evel just, an darempredoù etre Perrot hag an "emsav" politikel.

Anv a vez graet eus lizher Y.-V. Perrot d'ur vaouez eus Lanveur, ul lizher a oa kondaonet luskad Lainé ennañ gantañ... diwar abegoù relijiel...

Taolennet e vez an Emsav

politikel breizhek hag an dud pouezusañ oa ennañ : Olier Mordrel, Lainé, Delaporte, gant ar c'hudennoù oant o'n em zifretañ enne. Kendalc'h ar P.N.B., hini 1943 war a seblant, a vez taolennet deomp... Betek peseurt poent eo gwiristorel kement ger a vez distaget gant hemañ-hen? Daoust ha n'eo ket un dra vat, forzh penaos, kinnig ur vrasvelidigezh eus an emsav politikel breizhek er mare-se? Hag an emsav er mare-se dreist-holl... Ur gentelig istor evit meur a

hini.

Souezhus-tre eo e vije bet eskob Kemper, an aotrou Duparc, e kendalc'h ar P.N.B. evel ma vez diskouezet deomp. Diouzh un tu n'eo ket digredapl a-grenn pa ziviner e oa darempredoù etre P.N.B. Delaporte hag an Iliz... Diouzh un tu all ne c'heller ket kredif e vije bet diboeñ a-walc'h, an eil hag egile, an eskob hag ar P.N.B. evit en em ziskouez ken frank... N'ema Duparc er c'hendalc'h war al leurenn nemet

* An doare-skrivañ hag ar gerioù skrivet gant pennlizherennoù a zo bet lezet evel ma oant en destenn meneget.



Yann-Vari Perrot gant Strollad ar Vro Bagan

© Louis Blouze

dre un dro-c'hoariva da zisklêriañ un diviz, da ezteurel an darempredoù P.N.B.-Iliz. Ne oa ket fall diskouez an darempredoù-se d'an holl koulz d'ar vroadelourien vreizhat ha d'ar vroadelourien c'hall a vez mall warne dalc'hmat teurel ar gwashañ war ar P.N.B. ha chom pikous ha mut war roll an Iliz.

Diskouezet e vez deomp aketus a-walc'h paotred an Emsav, hogen ger ebet diwar-benn paotred an "Eneberzh", paotred ar "Rezistañs".

Abalamour d'an dra-se e tleer lavaret n'eo ket ar pezh zo bet savet gant Strollad ar Vro Bagan ur pezh diwar-benn marv Y.-V. Perrot evel fed istorel, ur pezh zo e bal dieffennañ e varv, klask reiñ ur respont d'ar goulnenn "piv en doa lazhet Perrot? Perak?" evel ma roer da gredin alies a-walc'h.

Ha petra o dije kontet? Pa ne ouied ket kalz a dra p'o doa savet ar pezh...

N'o deus graet nemet degas

elfennoù zo eus obererezh Perrot hag o dije gelllet bezañ kaoz d'e lazhadenn: lennet e vez deomp evel-se ur pennad oa bet skrivet gantañ war *Feiz ha Breiz* diwar-benn karnel Katyn (ur garnel korfoù Poloniz a vije bet dizoloet gant an Alamanted el lodenn eus Pologna oa bet aloubet gant ar Rusianed...).

*
**

Lazhadenn Perrot a zo evelkent diouti e pep lec'h er pezh, o plaviñ evel ur spes: gwelet e vez en arvest kenañ ar pezh hag en hini diwezhañ ivez... Ur spes oc'h hentiñ ar c'hoari eo.

E-pad hanterenn gentañ ar pezh, pe war-dro, e vez ar c'hoarierien o tabutal diwar-benn Perrot, diwar-benn e varv, evit gouzout penaos e vefe dav dezho diskouez anezhañ, diwar-benn an doare a vefe digemeret o fezh gant an dud.

Pa ne ve ken an dra-se, e c'hellfed meizañ e oa bet savet ar pezh diwar-benn an "tabou"...

Pep hini eus ar c'hoarierien a zifenn e zoare dezhañ da santout, da gompren ar gudenn.

Lod a'n em anavezadenn en dudenn a c'hoariont (a'n em idantifi ouzh ar personaj a c'hoariont ma kirit...) Lainé pe vMordrel a vez evel-se, ha graet e vez "Lainé" pe "vMordrel" dioute etre ar prantadoù c'hoari zoken... Daoust hag un doare e vefe d'arouezh e vez pep hini o tifenn e gostezenn en un doare diobjektivel pa vez an dud o kaozeal, o tabutal diwar-benn an afer-se?

Lod all a vez enkrezet-bras: ha laosket e vint da c'hoari o fezh? Ha ne vefe ket gwelloc'h cheñch tra pe dra? Ha ne vefe ket o buhez zoken en larvar?

A-daolennadoù e vez diskouezet buhez Perrot hag etreze e vez ar c'hoarierien o tabutal. Er penn kenañ e vez pep hini o lakaat en a-

raok ar pezh zo ar pouezusañ d'e soñj. Ha goude, bep a dammig, e teu ar c'hoarierien da vezañ ankeniet-tre abalamour d'an darvoudoù a c'hoarvez er vro (tarzhadenn monumant ar re varv e Skrinag, ha kroaz Perrot bet diskaret eno ivez... Hag ar feulster a ra e reuz er gevredigezh, ar c'heleier a vez displeget war un ton mantrus er radio hag a gont kannoù gwadus a c'hoarvez war un dachenn fout-bol, a dalvez da heklev d'an taerder braouac'hus-se).

Ya, ar spes-se 'n 'ni zo oc'h hentiñ ar c'hoari. Argerzh enkreuz an drama a vez stegnet gantañ hag an aon.

Sevel ar pezh-se zo bet un enklask hag ur stourm. Ur stourm eo bet c'hoazh c'hoari anezhañ.

Bez' eo ur pezh diwar-benn marv Y.-V. Perrot evel arouez ha tabou, ur pezh a ziskouez pegen start eo kaozeal diwar e benn an deiz a hirio c'hoazh.

Pegen start komz am eus lavaret?

Pegen diaes e oa kaout ar gwir da gaozeal e c'heller lavaret zoken... pegen gwir oa bet klasket ampech Strollad ar Vro Bagan da c'hoari e bezh e Montroulez ha pa oa bet lezet a-gostez gant Gouelioù Kerne e Kemper...

Muioc'h evit c'hoari o fezh o deus graet: bewech m'o deus bet tro, o deus broudet an arvestourien da gaozeal, da gendivizout war-lerc'h ar pezh-c'hoari. Din da c'houzout o doa klasket dre deir gwech e Montroulez war-lerc'h ar c'hoariadenn gentañ, d'an 13 a viz Kerzu '85, e Kerahez e miz C'hwever '86 hag e Sant Noug e miz Du '86. Ha gwelloc'h zo bet marteze: ur c'helaouenner, iriket gant ar pezh-se, en deus bet furchet, skrivet pennadoù ha savet ul levr enklaskoù 'benn ar fin : *Qui a tué Y.-V. Perrot?*

An holl draoù zo deuet d'e heul a ro un dalvoudegezh dibar d'ar pezh-c'hoari-se: un elfenn oberiant er gevredigezh, un elfenn vunut-e-skoaz traoù all, a-dra-sur, hogen un elfenn oberiant en hec'h istor memes tra... Raktal oa bet meizet evel-se, a-raok

Remon ar Porzh & Yann Fouere er bloavezhioù '40



REMON AR PORZH : GERIADUR BREZHONEG-SAOZNEG RANN GENTAÑ A-B

Krog eo *Mouladurioù Hor Yezh* da embann ar c'hentañ geriadur brezhoneg-saozneg a-zoare. Ur geriadur saozneg-brezhoneg en doa embannet dija Remon ar Porzh da skoazellañ e skolidi eus skol-veur Corcaigh en o labour e 1979. An taol-mañ avat eo penn-kentañ ur pezh labour a zo kinniget deomp. Mont a ra 215 pajennad stank gant ar rann gentañ A-B hep kontañ ar raskridoù hag an digoradur war ar yezhadur.

Savet eo bet al labour-mañ evit daou rummad tud, ar saoznegerien c'hoant ganto da zozanaat o anaoudegezh eus hor yezh hag ar vrezhonegerien c'hoant ganto da zeskiñ saozneg. Brezhoneg-saozneg eo ar geriadur, da lavaret eo e kaver ar ger brezhonek da gentañ gant ar droidigezh e saozneg ha kalzik a skouerioù niverus eus implij pep ger a ro da sklêrijennañ e ster hag e arsterioù. A-wechoù zoken e roer deomp un displegadenn war an doare mat da implijout ar gerioù. Graet en deus e vad ar skrivagner eus e ouiziegezh hag eus al levrioù niverus bet fichennet gantañ. Ur vammenn boblek ha lennegel war-un-dro a zo d'ar geriadur-mañ. Pennaouet en deus stank ar skrivagner e yezh ar penbez, e yezh e vignon Yeun ar Gow hag e skridoù lennegel liesseurt. An troioù-lavar a gaver diouzh an druilh war hon hent n'int ket bet diwanet tamm ebet diwar studi ur c'horf marv... Perzhiek eo an oberour en e c'heziadenn. Santout a reer en deus graet ouzhpenn studiañ ar pezh, bevet en deus anezhi ha setu ar pezh a ro c'hoazh muioc'h a dalvoudegezh d'e labour. Eus Kastellvez ar Faou eo ar skrivagner ha bevet en deus en

ur gevredigezh a rae c'hoazh da vat gant ar brezhoneg...

Anviou divoutin a gaver ivez war ar roll, anvioù-tud hag anvioù-lec'h, resisaet eo neuze o lec'hiaer er skridoù pe war gartenn Breizh pe hini ar bed, n'eo ket atav diezhom! Titouroù stank a gaver ivez war bed an natur, plant, laboused, pesked, h.a. Diaes e vez a-wechoù reolenñ war an implijoù disheñvel a zo a dolead da dolead pe a skrid da skrid war ar poent-se war anaoudek omp da Remon ar Porzh da vezañ klasket lakaat urzh war an dachenn-se, reiñ a ra bep tro ar stumm latin hag al levr skouer. Sellit, paneve ken ouzh ar ger *aval* da welet peseurt anaoudegezh en deus ar skrivagner war ar gouennoù avaloù liesseurt a gaver er vro pe en diavaez... Dilezet betek re e oa bet an dachenn-mañ, a bouez eo ivez koulskoude! Amañ ivez e vo da costañ evit ar re a gemero ar garg da sevel ar geriadur brezhoneg holl, ar geriadur unyezhek klok kenañ, hon eus kement a ezhomm anezhañ.

Ul labour a bouez en deus boulec'het Remon ar Porzh, chafis vat dezhañ da gas an hir a erv da benn. Ra vo graet c'hoazh ur c'hammed war-raok er stourm da zivevañ ar brezhoneg, d'e zivebiñ diouzh bed ar galleg ha ra vo digoret un tammig frankoc'h prenester Breizh war ar bed, evel ma c'hoantae Roparz Hemon.

Remon ar Porzh, Geriadur Brezhoneg-Saozneg, I A-B, Mouladurioù Hor Yezh 1986 [1 plasenn Charles-Péguy 29260 Lesnev].

PADRIG AN HABASK

an abadenn gentañ zoken... Dibunet oa bet diouzhtu an aéroant ha c'hwezet an tan... ha graet eo bet e labour gant ar pezh, adlaset eo bet an tabut ha deuet eo an tabut-se da vezañ un diviz hag un enklask... Un emdroadur zo bet, ret eo hen anzav, eus abadenn Montroulez da zivizadeg Keraez ha gemere perzh enni paotred eus ar Reizstañs, evit mont betek levr enklask Guidet.

Daoust ha n'ema ket aze trec'h gwirion Strollad ar Vro Bagan?

* *

Dav e vefe skrivañ ur pennad a-bezh diwar-benn an divizadegoù-se hag al levr-se...

Goude bezañ bet komzet diwar-bouez danvez ar pezh e chom un nebeud traoù da lavaret diwar-benn e stumm: ar c'hoariva n'eo ket nemet danvez; faltazi ha hudc'hoariva a zo ivez.

Ur wech c'hoazh o deus c'hoarierien Strollad ar Vro Bagan bamet an arvestourien gant doare o c'hoari.

Troioù hag ebatou leurenn a vez graet gante a vare da vare, alies da



Aotrou Perrot, roit deomp skozell. Evidomp-ni da genderc'het. (Gant an erv ho peus bouc'het. An erv don ho peus toullt (V.S.)

UNVANIEZH - KARANTEZ

lennit 'ta CHOLORI

lennit 'ta TALABAO

aroueziañ tra pe dra difetis, degas prantadoù dudi a ra an doare-se ivez: amañ, un doare koroll diroll ha pennfoll d'aroueziañ ar brezel '14; ahont, beleien o kerzhet a-unan war un ton fentigellus...

Ur wech bennak e teu ar c'hoarierien da c'hoari e-keuz an arvestourien. Lod a vez kustum a-walc'h ouz an doare-se bremañ, hogen fentus e oa gwelet emzalc'h an dud ne oant ket boas: kalzik a dud deus ar vro ha ne zarempredont ket ar c'hoariva a deue da welet buhez Y.-V. Perrot.

Reuziadoù fentus a zo ivez er pezh: pa zeu ar vouzed da zegas ar simbol d'ar beleg kar-e-yezh, pa'n em gav an eskob ha Perrot e gonel ar *Bleun Brug* evit kaozeal diwar-benn traoù relijiel-ha-politikel... war un ton dañs a laka nê da zañsal hag int da zerc'hel da zivizout sirius-tre en ur zañsal.

An tremen trumm eus ul live c'hoari d'un all a zegas souezh ha fent ivez: ar c'hoarierien a vez o pleustrañ war buhez Perrot hag a-daol-trumm e c'hoariont o buhez...

Arvest kentañ ar c'hoari da skwer: Perrot gant e gollist zo o tont en-dro eus an oferenn zo bet lavaret en ur chapel. Un tenn fuzuilh; lazhet Perrot; tud da zont da veilhañ korf an hini marv; lidus ha kañvaous eo an "arcelc'h"... war stegn emae evezh an arvestourien, fromet int... Hag a-daol-trumm, Y.-V. Perrot, an hini marv, astennet a-c'hwen e gein war al leurenn, a ro ur pezh mell taol dom war al leur hag a hop: "Ha Mordrel, pelec'h an diaoul emae hennezh c'hoazh?"

En he barr emae gouestet aozerien Strollad ar Vro Bagan, hep mar... liesseurt eo an troioù-c'hoari er pezh-mañ; hag implijet kempouez e vezont...

"Met diouzh ho kredañ eo dreist pep tra er pezh-se," emaeoc'h o vont da lavaret din. Evit lavaret ar wirionez ez eus traoù da rebech evel kustum. Nec'het a-walc'h an evit menegiñ anezho bremañ: e fin ar pennad e tleer lakaat ar pouezusañ, sañset, ha padal n'eo ket grevus a-walc'h ar rebechoù a rin, ha pell ac'hano, evit diskar ar pezh am eus displeget uheloc'h.

Da zigenañ eo ret lavaret ne vez atav sklaer-tre an tri live zo er c'hoari. Ar c'hoarierien o vevañ o buhez o-unan: al live kentañ eo; an eil live: buhez Y.-V. Perrot; an trede live: e-kerz buhez Y.-V. Perrot e c'hoarier pezhioù-c'hoari all. Diaes eo d'an arvester gouzout bewech petra a wel, piv zo o c'hoari, gouzout lec'hiañ an arvest-mañ-arvest e-keñver ar re all.

Abalamour d'an dra-se ha d'ar stumm m'eo bet savet ar pezh a-daolennadoù, ne vez meizet gant an arvestourien nemet un doare heuliad skeudennoù dizurzh... Evel just ne oa ket soñj tud ar Vro Bagan kinnig un danevell savet mat ha kloz pa felle dezhe plantañ douetañs ha reiñ lañs d'an diviz; hogen bez' e teue mestr al leurenn da gaozeal gant ar c'hoarierien bewech etre abadennoù buhez Y.-V. Perrot, ha ne vije ket bet diaes dezhañ lavaret fraeshoc'h petra oa an tamm oa da vezañ c'hoariet goude ha sikour an arvestourien lec'hiañ anezhañ e-keñver ar re all.

D'an eil e kav din e tesson iskis pennad Y.-V. Perrot a vez lennet e fin ar pezh: ar pennad diwar-benn Katyn. Perak bezañ graet an dra-se? Peogwir e c'hellje ar skridoù a-du gant an Alamanted, a-enep ar Rusianed, a oa bet embannet e *Feiz ha Breiz* bezañ bet un abeg da gondaonidigezh Perrot d'ar marv?... Bez' ez eo un dra vat reiñ da c'houzout e oa bet pennadoù deus ar seurt-se. Setu unan all da skwer:

«Hag abaoe tiez kunv hor Breiz Vihan a zo goullou eus o gwazed kaera prizioniet, goullou eus o faotred yaouank en o bleñs aet da rei an dourn d'an Alamanted da stourm ouz gouezidi ar reter.»

Perak bezañ bet dibabet ar pennad diwar-benn Katyn ha n'eo ket hemañ?

Denelourieloc'h eo hini Katyn?... hogen bremañ ez eus heklevioù nevez gantañ ne oa ket dioute er mare-se abalamour d'an darvoudoù oa c'hoarvezet du-hont e 1978 gant Solidarnosc ha Jarulewski... Kalz krisoc'h evit Perrot e vije bet an dibab ma vije bet lennet an hini am eus meneget uheloc'h... Daoust ha kilet en dije Strollad ar Vro Bagan

un disterañ dirak lezenn an "tabou"? (an hini zo en Emsav...)

Ur rebech all a rin, ha sklaer hennezh avat, unan hag a seblanto bezañ kriz pe dister diouzh soñj pep hini.

A-feur ma ya ar bloavezhioù e-biou e falla brezhoneg ar c'hoarierien: steuziañ a ra muioù h-mui o fouez-mouezh brezhonek. N'eus nemet daou c'hoarier hag a gaoze mat... ha c'hoazh, kaozeal prop ne vire ket oute a lezel o zaol-mouezh da "risklañ" ur wech an amzer... ur blijadur e oa o c'hlevet memes tra, en ur mare a zienez evel m'eo hini er c'heñver-se... Hogen ar re all...

Sed amañ un nebeud skouerioù tennet eus fin ar pezh. Mouezhioù o huchal ouzh Perrot: "trubard" "treitour-our" (islinennet eo bet ar vogalemm pouezmouezhiet, an daoubik ":", a verk eo hir ar vogalemm, ar bir "a-us d'ar vogalemm a ziskouez ez eo-hi toniet war-gresk.)

Ur wech bennak e klevet memes tra: "trubard".

Ha skwerioù all a-hend-all: "boched", "en-dro dehañ", "kae alege neuhe", "ne oa ket aze er penn kentañ", "sotomou" (ar skwerioù-se am boa notet e-kerz c'hoariadenn Lesneven d'an 11 a viz Ebril 1987).

Tud Strollad ar Vro Bagan ne seblantont ket bezañ gwall nec'het gant ar pouez-mouezh (nemet teurel pled pouezmouezhiañ pouner ar gemell a reont aketus a-walc'h: "un den"; "un tenn"... da ziskouez splann o leonegezh?) N'int ket gwall chalet gantañ a-hend-all hag en abeg da se e vezont kaset gant lanv ar galleg, levezon ar pouez-mouezh gallek, evel e c'hoarvez gant an holl dud ne vezont ket emskiantek ouzh ar stourm a zo dav ren war an dachenn-se ivez.

Ar rebech-se, ha n'eo ket, evidon, un dister a dra, ne zle ket kuzhat evelato ar perzhioù mat em boa meneget en a-raok.

* *

Pa soñjan mat, e kav din emae Strollad ar Vro Bagan e barr e



ampartiz da sevel pezhioù-c'hoari (pa lezer a-gostez kudenn ar pouez-mouezh).

Troioù leurenn (pe efedoù leurenn), farsus pe boanius, kempouezet mat, lusk psikologel ar pezh, an temoù a vez kont dioute, argerzh an drama... Ya ur pezh-c'hoari dreist eo c'hoazh, pinvidik evit ar re all...

Sur a-walc'h e vo dalc'het koun eus ar pezh-se en istor al lennegezh vrezhonek, n'eo ket abalamour m'eo ur savadenn arzel a-feson hepken, hogen en abeg d'ar roll en deus c'hoariet er gevredigezh e Breizh. Meneget em eus fedoù zo: ar pennadoù er c'helaouennoù, tabut e


Yann-Vari Perrot, gant Strollad ar Vro Bagan

(isk. © Louis Blouca)

ti-kêr Montroulez, an divizadegoù hag an enklaskoù nevez...

Ne vez ket gwelet alies pezhioù-c'hoari o krouñ fedoù kevredigezhel, bezañ elfennoù hag a laka ar gevredigezh, pe ar speredoù enni kentoc'h, d'en em dreñ en ur reiñ lañs d'un diviz "yaus" a oa ezomm dioutañ.

IVON GAG



sk. P. Pascal ar Miroc'hig

Losket eo lorn an aodoù

porzh-mor didud o tizourañ kaeoù teuzet el lugenn gevr merglet porzh-mor ha c'hwez ar pesked sko spineged spinek o vreinañ er boestoù plastik gell-ruz porzh-mor ha c'hwez an donvor donvor doñv mor louet o sklokal ouzh ar chaoser porzh-mor ha c'hwez ar mazout skrign ar gouelan kein du sec'hor don ar boc'haniñ o tistreiñ d'e rec'hell ar bagoù er fes bagoù

chiboud bagoù o sankañ el lec'hid o tigeinañ ar preñv o talarañ ar c'hoad-kamm o tenañ ar c'hambonoù ar preñv o krignat ar c'halbourzhoù hag ar c'hoad o c'hwezhañ razhed an aod razhed lart an izelvor o c'hoari a-hed ar portolioù razhed o spian dre ar gremmoù digor-frank ar c'hoad o c'hwezhañ hag o tarzhañ douget o deus ar bagoù-se goanag ha levezet sammet o deus doan

ha reuz degaset o deus ar c'hañv breinañ reont er porzh-mor dilezet kourmoul o kuzhat an heol an oabl o teñvalaat un dremmwel skeud ar c'houmoul o tuañ ar mor glac'har war ur mor ludu mor lovr morniz poukr ar mare-drec'h o treiñ da vare-lanv anv ar bed o treiñ porzh-mor didud war e dalaroù aet eo ar vugale d'al labouradegoù pell d'ar c'hêriou skleri-

jennet ha ne zeuint biken ken 'n eus netra d'o dere'hel aet eo ar vugale ha marv ar re gozh martolod diviet asket e zaouarn gant ar palae'hoù pesketour ar c'houlz marv micherourez krafignat he daouarn gant an hili porzh-mor mordoet pa vo disklaved an amzer gant sklaerenn rouz-an-noz loket an oabl koabrek pa vo disklavet e vo gwelet ar vaouez kozh gwisket du koef kañv maouez kozh he dremm roufenn o tiskenn kammdigamm klipaklop klipaklop o hediñ ar riblenn faoutet harpet war he c'hanenn horos he dar-greiz ha storlok he divesker klipaklop klipaklop maouez kozh hec'h evnor skoanet hec'h evnor deuz hec'h evnor deuc'h maouez kozh he chal gloan du war he c'hein krenezh he dorn kurzet war bommell ar ganenn dorn koazhet dorn koaget gant ar remm dorn koar gwehall gwehall trouz mone-done ar vartoloded o tougen o faneradoù sardin deus ar vag d'ar fritur martoloded fogaserien ha gaoleien ha roulerien bev oant gwehall youc'hadennoù ar c'homiserezed kunujennoù hudur kebened ar werzh gwehall ar paner malestrañ ar paner du war doenn ar fritur ar rouedoù glas o tizouriñ ar gouelioù o sec'hin hag ar rouedoù da gordeniñ bagoù diwerniet gwehall c'hwez ar c'holtar hag ar balan devet er

fronelloù maouez kozh o ruzañ he botoù barzh poulligoù dour an hent skeudennoù o kazarc'hin hec'h evnor skeudenn ar wazed o sachañ war ar c'harennoù pa veze kalm-chok skeudenn ar vag o stourm ouzh ar gorventenn gant an avel o c'hlazañ hag an tarzhoù o skeiñ ouzh moñselloù ar vag skeudenn ur c'hazh-rous higennet hag ur vorgaolenn o steuziñ er mor houll maouez kozh o hediñ kae ar porzh-mor didud porzh-mor dilezet he bugaleaj alese he deus gwelet ar wazed o vont da greiz gwazed war o bagoù divvern greiet hoc'h o vont da c'horren o vont da lonkiñ mor se a oa gwehall sellout 'rae ouzh ar vag o tostaat goustad didrouz bouad an houlennoù o vougañ yud an avel grik 'tousez ar merc'hed studez war ar c'hae daoulagad buket war ar vag o tistreiñ deus ar gorventenn bag he bourzh frailhet bag kollet he gwern hag he gouelioù roget o tostaat ha daoulagad ar merc'hed o klask spurmantin un dro-linenn tro-linenn ur gwaz un tad ur breur daoulagad o vervel frond ar marv o leuniañ an aergelc'h ar marv o rugañ sparfell pe falc'hun dindan ul loar glas labous-preizh an ankou war-nes pluiañ ha pakañ an den e donkadur diasur hag ar vag o tostaat tonkadur bresk ar re baour tonkadur o horjellat hep an disterañ tore ar vag o tostaat didrouz didrouz e c'hou-

HOR YEZH

KELAOUENN A YEZHONIEZH
savet e 1954 gant Arzel Even
Renner : Per Denez


Ouzhpenn 170 niverenn
denet er-maez

— niverennoù all e-maez rummad —

kourmaniñ : 60,00 lur
(evit peder niverenn)

Yann Desbordes
1 plasnenn Charles-Péguy
29260 Lesneven

zañv ar re baour rak uvel int ha pedennoù pedennoù divouezh o doue degaset ma den d'ar gêr leoù kuzh leoù mut e askre pep hini promesa un ex-voto da santez Anna degaset ma den en-dro selloù gleb selloù o veuziñ e-barzh kasoni ar mor gast a vor mor rukunus a laer rusk ar vuhez a laer a wazed a lonk ar garantez hag ar c'hwed peñseoù ar merc'hed o c'hortoz ha luc'h trumm ar goanag o tifloskiñ a-dreñv an daeroù ar vag o tostaat c'hoazh lusk-dilusk bremañ e oar gwelout 'ra n'emañ ket he den war ar vag silwink ha kievout 'ra hiboud ar guzhut o tislepañ ar c'heloù 'mañ ket Fañch war ar vag Fañch he den kollet er mor stouin 'ra he fenn kilañ 'ra ha pellaat dav kemenn ar c'heloù d'ar vugale bugale aet kuit pell zo ha ne zistroint biken evorioù ur vaouez kozh o hediñ kae ar porzh-mor didud porzh-mor dilezet maouez kozh o kerzhout davet neblec'h o klask hepken skeud he yaouankiz e ruster an noz o kouezhañ



sk. P. Pascal ar Miroc'hig

Gwallus evit ar yaouankiz

N'eus ket pell e klaskas kenlabourien bPasqua diskar un dornad kazetennoù. Hervez, e oant gwallus evit ar vugale.

Un doare ne oa ken, evit ar gouarnamant, da ziskouez d'ar gazetennerien n'edont ket mui en o frankiz.

Un dra a zo heverk koulskoude. Tennet ez eus bet implij eus ul lezenn anavezet-mat. He reuz he doa graet dija, dek vloaz zo, p'edo Giscard e penn. Hemañ, ma'm eus soñj mat, en devoa taget *Charlie-Hebdo*, *Pilote* ha *Métal-Hurlant*.

Ul lezenn forçhellek-kenan eo hini 49, a-ouenn gant Lez-Varn Surentez ar Stad. Houmañ avat a zo bet torret gant ar sokialourien. Miret o deus al lezenn...

Lakaet e vez an holl gazetennou en arvar gant lezenn 1949, rak e pep hini anezho, pa furcho a-zevri, ez eus tu diskoachañ un dra bennak "gwallus evit ar yaouankiz".

An diskoulm nemetañ, neuze, a vije treiñ an holl gelaouennoù e kelaouennoù evit ar vugale. Pezh ne zispilje ket d'ar gouarnamant a-dra-sur (na d'ar prezidant, pa c'hoari bremañ e "dadig ar vro").

N'eus risk ebet forzh penaos? Gwell eo teurel pled koulskoude rak an aergelc'h politikel a gemm buan. Hen desket hon eus abaoe dek vloaz.

Gai-Pied a oa e-mesk ar c'helaouennoù taget, dezhi da vout, a-raok pep tra, ur benveg kelaouiñ.

Erotekoc'h eo, a ranker anzav, eget *Femmes d'Aujourd'hui* pe *Marie-Claire*, mes speredekoc'h ivez.

Ezhomm ez eus anezhi war a seblant, peogwir e tizh daou-ugent mil lenner bep sizhun. Ur skouer evidomp, rak diaesoc'h eo c'hoazh bezañ heñvelrevour eget bezañ emsaver.

Edo *Gai-Pied* o c'hortoz un taol-fall ofisiel bennak koulskoude. Hen merzout a raed a-dreuz lenn ar pennadoù-stur sizhuniek, difizius e-keñver ar gouarnamant: poan o devoa mourroù Malhuret da guzhat e strizhsperedegzh geneiled. Abaoe miz Meurzh '86 e oa bet lamet kuit ar poltridi krennarded, a veze rouez forzh penaos.

Degouezhet pezh edod o c'hedal evelkent. Un taol spontañ ne oa ken marteze. Hogen n'eo ket bet gwellaet stad lennerien *Gai Pied*: ar Sida diouzh un tu, Pasqua diouzh an tu arall. Peadra da zigalonekaat.

Diskouezet-splann ez eus bet avat pegen ebet o

Pasqua. Hel lavaret em eus: kalz a lenn *Gai Pied*. En-reoliek hag en-sirius e vez kelaouet he lennerien. Fiziañs o deus en o c'hazetenn.

Deuet eo da vezañ ur benveg prizius-kenan ouzhpenn p'emañ ar Sida o'ch ober e reuz.

Kalz muioc'h a reuz en dije graet ar c'hleñved avat ma ne vije ket bet eus ar gazetenn-se, an hini nemeti en Europa. Diouzhtu eo bet dedennet evezh al lennerien. Aspedet e vezont bep sizhun da ziwall.

Hep ar gazetenn e vije bet niverusoc'h, kalz, ar glañvourien.

Petra a c'hoarvezfe hiriv ma lazhe ar gouarnamant ar gazetenn-se? Netra a vat, a-dra-sur, nag evit lennerien *Gai-Pied*, nag evit ar re all.

Hen gouzout a raemp dija: gwallusoc'h eo Pasqua, hag eñ vil ha gwisket, eget gwazed yaouank *Gai Pied*. Henezh siwazh, n'eus ket anezhañ ul luc'hskeudenn liv hepken.

PASKAL AR MARC'HEG



sk. Paskal ar Marc'heg

N'EUS FORZH PETRA ? !...

● Ur c'heloù trist a-walc'h bremañ lenner war *Ouest-France* (24.04.87):

● **BÉCASSINE EN DESSIN ANIMÉ** - Il s'agit d'une Bécassine moderne puisqu'elle utilise la palette graphique et les nouvelles images. C'est une coproduction franco-belge en 160 épisodes de six minutes.

Pet milion a vo dispignet da sevel ar filmoù bihan-se evit ar vugale? Ar gwir o do, eta, yaouankizoù Europa (ha Breizh evel just) da welout an dislonkadennoc'h-se, gouenneler hag enepbreizhat! Ha klammet 'vo gant un sozadur bennak?

● War an hevelep live eo dav lakaat an diskleriadur da heul. Ouzhpenn tregont vloaz zo eo bet skrivet kement-se, met diskouez 'ra speredegzh an den:

«*Le Barzaz Breiz* est sans doute un beau livre pour un adulte averti. Mais il faut avoir le courage de dénoncer la malhonnêteté de ceux qui voudraient en faire un livre de chevet pour la jeunesse.»

F. Falc'hun *Le Progrès de Cornouaille* 01.05.54

Muzuliet 'vez aze pegen don ha pegen lemm eo spered an dev. Meizet 'vez ivez perak e rim ken brav chaloni gant koniri...

● Echuñ 'rin gant ur fazi mantrus. En e studiadenn diwar-benn skrivagnerien bro Leon (*Ar Falz* Nnn.56 p.31) e skriv Mikael Madeg kement-mañ diwar-benn Aboezen:

«Marw e 1953 e Sant-Brieg»

Un tammig enklask 'n ije sikouret Mikael Madeg da c'houzout e oa marv Fañch Elies e 1963, er Baol. Aliañ 'ran Mikael Madeg da lenn Nnn.100 *Al Liamm* (Gwengolo-Here 1963) gouestlet da F.Elies-Aboezen.

BOZIAN TRUCHON



DOUE EN UR MIRDI: POENT BRAS E OA!

Da-gañver addigoradur ar mirdi breizhek, adkempennet hag adneveset, e oa bet azoet en diskouezadeg gant Skol-Uhel ar Vro e Kemper diwar-benn ar "Vretoned ha Doue". An danvez-se a dalveze ar boan, hep mar ebet, bezañ pleustret wamañ, ken bras ha ken don m'eo bet hag eo c'hoazh levezon ar relijion war buhez ha spered hor c'henvroiz. E-barzh armelioù-gwer pe c-kreiz ar sal, e oa tu da welet traoù ha benvegoù a servije d'an ofereñoù, d'ar prosesonioù, delwennoù euzhus da spontañ ar feizidi, tout ar stalikerzh bet implijet e-pad kantevedoù da sankañ don e-barzh penn ar Vretoned ar boaz da sentiñ, da blegañ, d'en em nac'hañ evel tud vev gant o c'hoantoù a dud, da gaout aon rak an nevezentiou, en ur ger, talvoudus e oa evit gwir un diskouezadeg evel-se evit neb a zo dedennet gant istor an traomatism broadel breizhat. E-barzh ur sal-fifvskuedennadur, e c'helled sellout ouzh ur film o kinnig deomp taolennoù propaganda Mikael an Noblez hag ur brezegenn a spontouriezh spered gant Julian Maner, an hini ne oa ket bet kalonek a-walc'h da zeskiñ brezhoneg pa c'halle ur burzhud hen ober en e blas ha pa veze tud e-leizh o klukan kement krañch a zifurke eus beg ar veleien. Da-gañver ar misionioù e veze dalc'het an dud e-kreiz ar c'hantikoù, ar pedennoù, an oferennoù e-pad ugent eurvezh! Ur farsite, m'hel lavar deoc'h! En e goazeg em c'hichen hag a-gevred gant ur vandennad kelennerien, e oa ur c'huzulier eus departamant Penn ar Bed, anavezet-mat e Kemper pa weler e benn du-mañ war gement moger tro mare an dilennadegoù. Hor politikur bamek-mik an tamm outañ, ne rae nemet mouskanañ kantikoù anezhañ, tra m'edo da vat ar jezuzt

brudet o tisonkañ e anaoueoù, ha tra ma oa bamek d'an ifern ar gomunourien hag an anarkourien gant beleien an XXvet kantved. Souezhet ne oa ket tu da vezañ pa ouied eus peseurt strollad e oa hor masikod, arabat din kinnig deoc'h un divinidadenn: ur revr liv-ruz e oa hon den evel just! Hor rokardian a oa deuet en-dro d'e soñj e oferennoù a vugalej, diazez e sevenadur sokialour a oad-gour.

E sal an ugentved kantved, ma oa meneget dreist penn biz difreot an enepkloerlezh, e tiskoueze un armel-wer avat levezon ar relijion war ar votadegoù sindikal e Breizh, en ur ginnig ur gantenn warni dregantadoù ar C.F.F.T.C. hag ar C.F.D.T. a-gevret. Feuket e voe neuze hor c'hamalad eus ar P.S.-C.F.D.T. peogwir e oa diskuliet ar pezh na zeuont ket a-benn da guzhat: ar piñsin dour benniget ma'z int bet soubet ennañ. Pa lavaris d'hor politikur ne oa ket trawalc'h teuler ar c'hroazioù el lastez ma chome divoulc'h atav kelennardurezh kevredigezhel an Iliz, ne reas ken nemet respont din e oa ar C.F.D.T. ur sindikad o strivañ kalz abaoe bloavezhioù evit dont a-benn da gompren an ekadenn ekonomikel hag ar bed a-vremañ: dizoloañ ar gapitaloureizh kant vloaz war-lerc'h, da vihanañ, ha plegañ dezhi, setu aze evitañ, sur a-walc'h, ur broenn a boellegezh hag ar arakadenn! Kimiadiñ a ris diouzh hor c'hroazouriañ a-vremañ ha gwech degouezhet en diavaez e tennis ma anal, divec'hiet: an amzer dremenet an hini a glozer en ur mirdi.

PÉRIG KOF-RUZ



Tudu

KOUMANANTIT D'AL LANV

al larv



Tudu

59 hent Kerdronioù Vihan
29000 KEMPER

koumanant (6 niverenn) : 100,00 lur
koumanant skoazell : 130 lur